

# IMBOURCH

Niverenn 38

28 C'hwevrer 1973

IMBOURC'H, KE LAOUENN BOLITIKEL

Pevare bloavezh

Niverenn 38

28 C'hwevrer 1973

Daoust ha komz a c'heller eus ur sevenadur brezhon ? .....	p.59
Keleier liesseurt.....	p.67
Ar saverezh-listri e Breizh, gant Jakez ar Bihan.....	p.75
Geneliezh ur c'homunour, troet gant Yann Morvan.....	p.79
An danvez kannaded "breizhat" da zilennadegoù ar 4 a viz Meurzh.p.	83
Notenn diwar-benn René Levesque.....	p.87
Klaoustre Bro-Gebeg gant René Levesque, troet gant Yann Morvan..	p.89

---

Koumanant-bloaz : 30 lur (gant ar geriadur armerzhel). K.R.P. Y. Ollivier,  
1 534 25 Roazhon. Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver. Priz nan  
niverenn-mañ : 4 lur.

Ar pennadoù a zo da gas da Y. Ollivier, 7 bd. A.-Burloud, 35000-Roazhon.

CPPP : 50 015

ALI D'AR GOUMANANTERION

EVEL ER BLOAVEZHIOU TREMENET E KENDALC'HIMP DA GAS IMBOURC'H  
D'AR GOUMANANTERION BETEK MIZ MEURZH. GOULENN A REOMP START  
DIGANT AR RE-MAN KAS O ADKOUMANANT ADAL BREMAN, MAR GELLONT.  
AR RE NA VEFENT KET MENNET DA ADKOUMANANTIN A ZO PEDET DA GEMENN  
DEOMP O SONJ. KEMENT-SE A RENTFE SERVIJ DA VEREREZH AR GELAOUENN.

EVIT DIORREN AR GELAOUENN, KRESKIN NIVER AR PAJENNOU HA GWELLAAT  
AN DISKOUZADUR ANEZHI HOR BEFE EZHOMM KOUMANANTERION NEVEZ. ANAOUDEK  
E VEFEMP OUZH HOL LENNERION MA C'HELLFENT POURCHAS DEOMP ANVIOU  
DANVEZ LENNERION NEVEZ.

=====

-----  
D A O U S T   H A  
K O M Z   A  
C ' H E L L E R   E U S  
U R   S E V E N A D U R  
B R E Z H O N ?  
-----

En devezh all - s ser ur  
gendael dalc'het dirak skolidi  
ur skolaj eus Roazhon diwar-  
benn ar "c'hultur" keltiek" -  
on bet lakaet da brederiañ  
adarre diwar-benn ur gudenn

ha n'eo ket diluziet mat biskoazh, a gav din, gant an  
emsaverion : hini ar sevenadur brezhon.

Abaoe maz eus un Emsav o deus an izili anezhañ  
diazezet o stourm war ur "sevenadur brezhon" a oa da zifenn  
a-enep d'ar "sevenadur gall". Evit lavarout ar wirionez  
ez implije ar stourmerion neuze ar ger "kultur" a glote  
penn-da-benn gant ar ger gallek "culture" a zo unan eus  
ar gerioù-se na n'o deus bet biskoazh er yezh-se ster  
resis ebet, ken e c'heller lakaat dindano an dalvoudegezh  
a garer ; aet eo un aozer gall betek lavarout e oa ar  
g"culture" kement a chom e spered un den goude m'en deus  
disoñjet pep tra. Kement-se a verkan evit diskouez n'eo  
ket fur mont da amprestañ digant yezhoù estren gerioù ha  
n'eur ket evit reiñ ur ster pervezh dezho.

Ne vern penaos, ar pezh a intended dre ar ger  
"culture" er c'hentañ Emsav e oa ar stuzegezh poblek diwar  
ar maez, ar gizioù poblek, ar gwiskamantoù, al lennegezh  
poblek, ar c'hánaouennoù hag ar c'horolloù poblek h.a.  
Ar stuzegezh-se an hini eo a oa da zifenn ha da virout  
war un dro gant ar yezh poblek hec'h unan.

Ret eo lavarout e veze roet neuze un dalvoud-  
egezh hud ha tregorfoniel, koulz lavaret, d'ar "c'hultur"-  
se. Hemañ a oa frouezh ar ouenn, koulz lavaret ; aba koun  
e oa bet ur "ouenn geltiek" e Breizh ; dre natur e oa ar  
ouenn-se faltaziek ha karantezus, taer ha tener war un dro.



Dre natur eta o devoa ar Vrezhoned an temz-spered a oa dezho.

Ar meizadur-se eus ar "c'hultur brezhon", frouezh ar "ouenn vrezhon", a voe ivez dre vras hini an eil Emsav. Kreñvaet e voe ar gweladur-se eus an devoud brezhon gant emled ar ouennelouriezh en Europa etre an daou vrezel. Er studiadenn gaer a voe embannet gant Maodez Glanndour ebarzh STUDI HAG OBER e-pad ar brezel diwar-benn ar "speredegezh vrezhon" e loc'h ar skrivagner diouzh an hevelep savboent nemet e tiwall da resizañ evelkent - hag ar resizadenn-se a zo a-bouez-bras - n'eo ket mat dre ret kement perzh a zo eus ar speredegezh vrezhon ; ur bobl - evel pep den - a rank kemm doareoù siet he speredegezh ma fell dezhi en em zifenn a-enep d'hec'h enebourion. An tech da blegañ bepred, an emzilez, a zo bet tremenet d'ur vertuz relijiel, ne glot ket gant retderioù ar stourm a rank bezañ renet gant pep stroll a fell dezhañ dreistvevañ.

En un doare souezhus a-walc'h ez eo en em ziskouezet ar mennozioù naturelour-mañ en ur stumm all en trede Emsav, nemet en tu kleiz en dro-mañ ("gouennelouriezh" ar c'hentañ hag an eil Emsav a c'helle bezañ lec'hiet a-zehoù dre ma oa harpet gant dehouelourion ha mirelourion dre vras). A-walc'h eo bet d'an trede Emsav - merkañ a ran adarre e komzan amañ eus an askell anezhañ a fell dezhi bezañ renket a-gleiz - kemm ar ger "gouenn" hag erlec'hiañ outañ ar ger "pobl" pe "werin". Hiziv eta, ur v... e reer eus ar bobl, - ar werin - enebet ouzh ar "vour 'hiziezh" krouerez ar "c'hultur brezhon" nevez. Setu bepred ar mennoz a oa difennet gant un ezel e eus an U.D.B. a gemere perzh ganin er gendael diwar-benn ar "c'hultur keltiek" am eus meneget uheloc'h.

An ezel-se eta en devoa enebet ouzh meizad an Emsav lec'h krouiñ ar sevenadur brezhon da zont bet displeget ganin en ur asuriñ e oa adal bremañ ur "c'hultur brezhon" a oa krouet war-eeun gant ar bobl hec'h unan ; bewech m'en em vode ar Vrezhoned e sell d'un ober bennak - politikel h.a. - e krouent ur sevenadur brezhon. Ar gwir sevenadur brezhon a oa eta hini ar festoù noz koulz hag hini an ec'hwelioù pe ar c'hanaouennoù poblek h.a. ha n'eo ket hini ar c'hel-  
aouennoù dirgel a zo embannet gant an "Emsav". Krouidigezhioù an "Emsav", distaget ha m'eo diouzh ar bobl, n'o doa netra da welout gant ar "sevenadur".

E-kerzh an emziviz a oa savet da heul ne voe ket tu gavout un emglev etre an daou savboent dre ma ne voe ket renet ar vreuradeg gant reizh ; ne voe ket kavet tro da dermeniñ ar meizadoù a oa e diazez ar gendael. Seul luzietoc'h e voe an daeladur ma ne voe ket kavet tu kenne-  
beut da resizañ lec'h ar yezh er "sevenadur" brezhon. Dalc'h an emziviz a oa koulskoude gouzout dres peseurt roll a c'helle kaout ar yezh er sevenadur brezhon, ur wech klevet ez eo dre ar yezh dreist-holl e c'hell ur bobl krouiñ ur sevenadur diforc'h (pezh n'eo ket anat 'm eus aon e spered meur a stourmer eus an U.D.B.) : lavaret hon eus meur a wech n'eo nemet o kemer ar brezhoneg da venveg eztaoliñ he sevenadur e vo gouest ar bobl vrezhon da dec'h-  
out diouzh gwall-levezon drastus ar sevenadur gall.

Ar gwellañ a zo d'ober eta a zo burutellañ unan hag unan ar meizadoù a oa roet da glevout gant paotr an U.D.B., difenner ar sevenadur poblek brezhon.

Gwelomp da gentañ ha bez e c'hell ar "ouenn" pe ar "bobl" bezañ krouerez a sevenadur war-eeun hep emell un etread bennak.?

Diwallomp mat amañ rak en diazez ar meizad-mañ emañ, d'hor soñj, an damkaniezh varksat penn-da-benn, war un dro gant an driviadelezh werinat a zo diouzh ar c'hiz gant stourmerion ar c'hostezennoù kleizat dre vras. Diouzh ali ar brederourion varksat n'he deus an hinienn roll ebet ; an engroez eo a grou an istor hag ar sevenadur a-gevret ; roll an hinienn eo hepken heuliañ an hent a zo bet kemeret gant ar bobl (er pleustr, er strolladoù a zo chomet stag ouzh an trede etrevroadelenn ez eo disheñvel emzalc'h ar stourmerion : ar c'hreizennerzh demokratel an hini eo a ren ; er strollouigoù kleizelour avat ez eo bet miret feiz ar stourmerion varksat kentañ).

Bezef pe vezef, pa seller ouzh degouezh ar sevenadur poblek e Breizh en 19vet kantved e c'heller en em c'houlenn petra a zo gwir en damkaniezh-mañ. Ma intender dre sevenadur un doare da gompren ar vuhez ha dagefleuniañ anezhi - ha penaos meizañ a-hend-all ar sevenadur ? - e ranker anzav n'eus bet sevenadur brezhon ebet en 19vet kantved.

Ar c'hontadennoù pobl hag an darn-vuiañ eus ar c'hanaouennoù pobl n'o devoa evit an dud a save anezho pe a selaoue anezho nemet un dalvoudegezh diduellañ ; ne enouestlent ket o buhez enno.

Ar sevenadur-se war ar marc'had, a vane hepken e par ar barrez pe ar c'horn-bro. Ne oa ket sevenadur ur gumuniezh politikel.

Diouzh ma rae ar "sevenadur" poblek-se - en-klozomp el lennegezh poblek al levrioù ledañ deskamant ha bruderezh relijiel - dave da dalvoudoù speredel ha buhezel ha d'ur preder bennak ne oa an talvoudoù-se nemet re ar gevredigezh maezel henvoazel stummet ha frammet gant an Iliz ; lakaomp eta e oant re an Iliz vrezhon diouzh



an izelgloer e Breizh stag a-dost ouzh ar werin. Hogen ne oa ket an talvoudoù nag ar preder-se re ur gevredigezh politikel vrezhon.

Kemeromp bremañ degouezh ar "sevenadur" breizhek a vremañ eztaolet er festoù-noz, er "beilhadegoù", en oberenn barzhed pe saverion ganaouennoù (Glenmor, Gilles Servat, Pol Keineg, Gweltaz ar Fur, Youenn Gwernig, Alan Stivell h.a.), en diskeladegoù poblet pe en "nevez-folklor" ledemsavel dre vras (kelc'hioù keltiek h.a.). Daoust hag an anaderezh-mañ a zerc'houez ur gwir sevenadur ?

Notomp n'eo ket heñvel a-grenn doare ar sevenadur nevez poblek-mañ ouzh hini ar c'hantved tremenet. Tennañ a ra ar stuziadur-mañ da vezañ hini ur bobl a-bezh ; fellout a ra deomp lavarout dre se n'eo ket mui mennet ar ganerion pe ar varzhed hon eus meneget da vezañ embannerion ur gronnad dister a dud o vevañ en hevelep korn-bro hogen hini ur bobl o klask emouezañ outi hec'h unan.

A-hend-all, diouzh ma ra al lennegezh pe an diskeladegoù-mañ dave da dalvoudoù zo ha d'ur bedveizadur bennak e wiskont un arvez sevenadurel bennak ivez (en dro-mañ, notomp mat, ez eo an talvoudoù hag ar bedveizadur-mañ awenet meur a wech gant ar varksouriezh e stumm pe stumm).

Evezhiañ a c'hellomp avat n'int ket krouet, nag ar re gentañ nag egile, war-eeun gant ar bobl hogen adarre gant frammadurioù strizh pe strishoc'h : ledemsav dre vras pe U.D.B. - a gemer da amkan bleniañ ha stuziañ ar bobl vrezhon.

Evit keloù se avat n'eur ket evit komz adarre eus ur sevenadur brezhon gwirion. Perak ? Peogwir ne ziwant ket an eztaolioù-mañ eus ur vuhez kefredel ha



speredel broadel brezhon ; ned int a-benn ar fin nemet heklev ar vuhez kefredel ha speredel gall daztaolet gant keff dasseniñ al ledemsav. Keit avat ha ne vo ket bet diorreet ur vuhez kefredel brezhon oc'h en em ziavaezañ dre ar yezh (hag houmañ ne c'hell bezañ renet er penn-kentañ nemet gant un toulladig a dud dispartiet dre ret diouzh ar bobl c'hallekaet) ne vo tu ebet da grouiñ er vro-mañ ur gwir sevenadur brezhon.

Kement-se a zo lavarout ivez ez eus meur a zerez er sevenadur. Kaer a vo ober ne c'hell ket ar stumm uhelañ anezhañ bezañ lodet gant an holl gwitibunan en amplegadoù a vremañ. Mammenn pep sevenadur a zo bepred strizh kenañ er penn-kentañ. Ar gristeniezh a zo diwanet diouzh ur bagadig bihan a dud, koulz hag ar varksouriezh hec'h unan. Dont a ra ar bobl da gemer perzh er sevenadur, da reiñ korf dezhañ, d'e ziorren ; hogen ne grou ket anezhañ.

Padal, pa lavar dalc'hidi ar sevenadur poblek n'eus sevenadur gwirion er-maez eus ar bobl ne lavaront ket gaou penn-da-benn, eveljust : ne c'heller ket empennañ degouezh ur barzh pe ur prederour meur o sevel e oberenn evitañ e unan : EVIDON VA UNAN n'eo nemet ur garm a zic'hoanag pe un anzavadenn a zic'halloud. N'eus barzh na prederour ebet ha na glaskfe, da gentañ, sevel ur gevredigezh goude ma vefe lec'hiet ar gevredigezh-se en un dazont dispis (hogen gwell eo dezhañ oberiañ a-zevri e sell d'ar gevredigezh a fell dezhañ sevel ma ne fell ket dezhañ treiñ sod). Ar bobl nevez a fell dezhañ krouiñ avat ne vo er penn-kentañ nemet ar c'hreunenn sev-se a zle kreskiñ a-c'houdevezh betek tizhout an neñvoù.

Evitañ da vezañ hollek eta n'eo ket ar sevenadur ur grouidigezh dishiniennekaet. En e stumm uhelañ e vez eztaolet bepred gant personelezhioù dibar (hag amañ e sav kudenn an arz e unan ; eus un emskiant leun e tiwan an arz ha n'eo ket eus an awen hepken ; en dro-mañ adarre e ra dalc'hidi ar sevenadur poblek galv d'an natur hag e kouezhont en diatebegezh). Goude hepken e teu ar bobl da genoberiañ ha da gengrouiñ gant diazezerion ur sevenadur. Kement-se avat ne ray avat nemet ma teu a-benn an diazezerion-se da aozañ ar framm o lakay e darempred gant ar bobl en ur reiñ tu da houmañ kemer perzh e krouidigezh ar sevenadur, goude ma ve war ur bazenn izeloc'h.

Dre se ivez e c'heller kompren ez eo diniver an danvez senevadurioù a zo ganet marv dre ma n'o deus ket gouezet dres lakaat en e blomm ar framm a aotre d'ur gevredigezh dreistpadout en ur virout he zalvoudoù. E Breizh ez eo c'hoarvezet an dra-se meur a wech en hon istor arnevez. Ar BONEDOU RUZ koulz hag ar CHOQUANTED, a gav deomp, a vije bet gouest da grouiñ ur sevenadur nevez ma vijent bet barrek ivez da aozañ ur framm a vije manet war an dachenn war-lerc'h o drouziwezh soudardel. Nag an eil nag egile eus al luskadoù-mañ n'o deus skoret war ur prederour gouest da reiñ ur ster hollek d'o obererezh ha da grouiñ evel-se egin ur sevenadur. A-henn-all petra a zo chomet war-lerc'h hor barzhed pobl eus an 19vet kantved ? Netra nemet dielloù poultrennek adembannet dre zegouezh evit dudi un nebeut furcherion. Petra a chomo a-benn ugent pe dregont vloaz eus oberenn hor barzhed poblek nevez a vremañ nemet, adarre, dielloù poultrennek ma ne vez ket savet a-benn ar fin ur gevredigezh vrezhon a gavo enno danvez d'en em gounañ.

Evit klozañ eta : arabat eo d'an emsaverion  
bezañ nec'het dre ma n'emaint ket e darempred gant  
ar bobl en he fezh adal bremañ. Lod an holl stourmerion  
o deus strivet da ziazezañ ur sevenadur nevez ez eo  
bet an digenvez-se. Dezhho hepken bezañ kalonek ha  
dalc'hus a-walc'h evit skoulmañ tamm ha tamm hag  
a nebeudoù an darempred gant an danvez pobl vrezhon  
o harpo da grouiñ ur sevenadur nevez el ledenez-mañ.

Y.O.

=====

#### NOTENNOU

SEVENADUR : ar ger "sevenadur" a zo bet degaset, war a seblant,  
gant Vallee ha Meven Mordiern a lakaas anezhañ da darzhañ diouzh  
an adanv "seven" ("n'eo ket gouez") ; alese ar stumm "sevended" a  
zo bet roet dezhañ a-wechoù er c'hentañ emsav (abaoe ez eo bet  
miret ar ger-se evit talvezout perzh an hini a zo "kourtez").  
Abaoe amzer SADED avat ez eur boaz d'e eren ouzh ar verb "seveniñ"  
a dalv neuze : pezh gaser da benn, pezh a severer. Implijet ez eo  
bet ivez ar ger "sevenadurezh" gant ur ster muioc'h dangorel ('sub-  
jektiv') : perzh an hini a zo seven e spered.  
Abaoe un nebeut bloavezhioù ez arverer ar ger "stuzegezh" a glot  
war-bouez nebeut gant ar ger "speredegezh" goveliet gant Maodez  
Glanddour e-pad ar brezel (tro-spered, doare da sellout ouzh ar  
vuhez). Diwar ar bon "stuz" (intentet evel an doare da "ersaviñ"  
ouzh ar vuhez) ez eo bet krouet nevez zo "stuziañ", destuziañ",  
"stuziadur", destuziadur", an daou c'her diwezhañ-mañ o klotañ  
war-bouez nebeut gant "culture" hag "acculturation".  
Ret eo notañ a-hend-all e rae SADED eus ar "sevenadur" un devoud  
hollvedel pe damhollvedel da vihanañ diazezet war an araezioù  
kenderc'hañ oc'h amplegadekaat doare ar vuhez pemdeziek : sevenadur  
greantel h.a. (en eneb e c'helle ar stuziadur bezañ lec'hel).  
E kembraeg e kaver daou c'her : "Gwareiddiad" o klotañ war-bouez  
nebeut gant ster diwezhañ ar ger "sevenadur" hon eus meneget.  
Er ster dangorel e kaver ar ger "diwylliant" ("di-ouezient")  
a glotfe un tamm gant "stuziadur", o vezañ komprenet ez eo muioc'h  
"nep-tu" ar ger "stuziadur" (mat pe fall) eget ar ger "diwylliant".

-----  
GERIOU DIAES DEVOUD/fait - ERLEC'HIAÑ/substituer - MEIZAD/concept.  
KEFLEUNIAÑ/accomplir - DISKELADEG/manifestation collective.  
EZTAOL/expression, manifestation. ETREAD/intermédiaire.  
DISHINIENNEKAET/désindividualisé.



## KELEIER LIESSEURT

### Korsika

Ne gemero ket al luskad rannvroelour "Action Régionaliste Corse" renet gant an Ao. Max SIMEONI, perzh en dilennadegoù da zont e miz meurzh. Ur c'hoapadurezh eo evitañ an dilennadegoù-se hag aliañ a ra d'ar Gorsikiz lakaat er jarloù paperennoù warno penn ur morian (arouez ar vro) pe al lugan "Skol-veur e Korsika" (unan eus pennañ arc'hadurioù al luskad).

En Ajaccio hag e Calvi en em ginnigo avat un danvez-kannad rannvroelour, an Ao. Dominique ALFONSI, dindan ar skritell "Parti Corse pour le Progrès" (Strollad Korsikat evit an Araokaat).

### Dilennadegoù e Breizh-Veur

Aozet e vo dilennadegoù hollek e Breizh-Veur en diskar-amzer 1974 d'an diwezhatañ, pe abretoc'h ma seblant spetusoc'h an degouezh d'an Ao. HEATH. Setu perak e stag ar strolladoù politikel d'ober darbaroù adalek bremañ hag evel e 1970 e kinnigo ar strolladoù broadel e Kembre hag en Alba danvez-kannaded e pep lec'h.

Ugent danvez-kannad a zo bet dija dibabet gant ar Strollad Broadel Skosat (Scottish National Party) ha seitek gant ar Strollad Broadel Kembre (Plaid Cymru).

### Dilennadeg rannel en Alba

D'ar c'hentañ a viz meurzh 1973 e vo aozet un dilennadeg rannel e Dun Déagh (Dundee) da heul disparti ar c'hannad dilennet e 1970, an Ao. George THOMSON (Strollad al Labour) da Vrussel evel Komiser ar C'henvarc'had Europat.

Dudius e vo gwelout pouez ar Strollad Broadel Skosat bremañ e derou 1973. Goude bezañ kresket en un doare sebezus e dibenn ar bloavezhioù 60 ez eas war wanaat ar Strollad Broadel Skosat goude 1970, evit meur a abeg (en o zouez e greskidigezh re herrus hag an diouer a sternioù frammet). Emañ bremañ en ur prantad-stabilaat.

Setu penaos e oa bet dasparzhet ar mouezhioù en dilennadegoù hollek diwezhañ e 1970 :

G.M. THOMSON (Labour)	22 630
J.A. STEWART (Mirour)	19 832
J. MacAULAY (Broadelour)	4 181
E.C. MacFARLANE (Radikal a-enep d'ar brezel)	176

Kinniget e vo ar wech-mañ c'hwec'h danvez-kannad evit sez an Ao. THOMSON :

William FITZGERALD (Mirour) Maer Dun Déagh



George MACHIN (Labour)  
Nathaniel GORDON (Frankizour)  
Gordon WILSON (Broadelour) bez-kadoriad ar Strollad Broadel Skosat  
George MacCLEAN (Strollad Skosat al Labour)  
John THOMSON ("Independent")

### Kudenn an tireoul skosat

Abaoe un nebeut bloavezhioù e vez imbours'het muioc'h-mui ar c'hondon e Mor an Hanternoz ha dizoloet ez eus bet gweleadoù tireoul ha tiraezhenn niverus dirak aodoù Alba met n'eo ket ar vro evit tennañ korvo diouto dre m'emañ e dalc'h Bro-Saoz ha dre maz int korvoet gant kevredadoù saoz pe etrevroadel.

D'ar 15 a viz genver e voe dalc'het e Dinedin (Edinburgh) ur "Vodadeg Skosat a-zivout an Dilabour", enni 800 dileuriad eus nerzhioù bev ar vro, da lavarout eo ar c'hweluniadoù, an Ilizoù ha dreist-holl ar strolladoù politikel (en o zouez ar Strollad Broadel Skosat). Goulennet-groñs e voe gant an holl a talvezfe an tireoul skosat evit diorren armerzh Alba ha splannoc'h e voe c'hoazh savboent ar Strollad Broadel Skosat, dre ma c'houlenn e chomfe en Alba spletoù an tireoul en o fezh.

(Uhel-tre e chom an dilabour en Alba daoust da welladennoù ar mizvezhioù diwezhañ. E miz kerzu 1972 e kaved c'hoazh 124 000 den dilabour er vro.)

### Ar vroadelourion skosat a-enep d'an treuzvarc'hadoù

E-kerz e vodadeg vroadel, a voe dalc'het e Peart (Perth) d'an 28 a viz genver 1973, en deus ar Strollad Broadel Skosat (Scottish National Party) distaolet da vat mennoz un emglev gant ar "Scottish Liberal Party" (Skourr skosat ar Strollad Frankizour saoz) da gefiver an dilennadegoù da zont. Tost a-walc'h eo mennozioù'zo eus ar Frankizourion d'ezzennoù ar Vroadelourion hag anat eo o deus ar re-mañ krignet dreist-holl nerzhioù ar re-se (hag ivez nerzhioù al Labour). Ur c'hreñlec'h frankizour e oa gwechall Alba e diabarzh ar "Rouantelezh Unanet".

Diskleriet en deus William WOLFE, kadoriad ar Strollad Broadel Skosat, e oa prest ar strollad da genlabourat gant kement hinienn a zegemere ivez amkanioù an emrenerezh hag ur parlamant dizalc'h evit Alba, met morse ne oa bet kaoz, tamm ebet, da skoulmañ un emglev gant un aozadur politikel bennak, waral live broadel.

### Emrenerezh evit ar c'hweluniadoù kembreat ?

Disheñvel-krenn eo ar c'hweluniadoù e Breizh-Veur diouzh c'hweluniadoù ar c'hevandir europat, dreist-holl re Frañs hag Italia. Ne gevezont ket kenetrezo ha n'int ket ken distag eus ar strolladoù politikel. Mont a reont er c'hontrol d'ober diazez al "Labour Party" (Strollad al Labour) dre hanterouriezh o bodadeg vras, an "Trade-Union congress".

N'eus ket avat un T.U.C. hepken evit Breizh-Veur a-bezh rak abaoe 1898 ez eus gant ar c'hweluniadoù skosaf ur vodadeg dezho o-unan, ar "Scottish Trade-Union Congress". Setu bremañ ma fell d'ar c'hweluniadoù e Kembre krouiñ ur vodadeg dezho o-unan ivez, a vefe anvet "Welsh Trade-Union Congress" e sell da bleidiñ gant kudennoù a-ziforc'h Kembre.

Ne dalv ket an emdroadur-se evel-just e tro ar c'hweluniadoù e Kembre a-du gant ar vroadelourion, tamm ebet. Derc'hel a raint da skorañ politikerezh al Labour. Diskouez a ra memestra eo deus meizet al labourerion gembreat e oa ganto kudennoù disheñvel diouzh re ar vicherourion saoz ha na c'hellent bezañ diskoulmet nemet e framm Kembre.

#### Ar stourm evit ar c'hembraeg

Derc'hel a ra "Cymdeithas yr Iaith" (Kevredigezh ar C'hembraeg) d'ober cholori evit ar c'hembraeg ha ne dremen ket ur sizhunvezh e Kembre hep ma vefe anv eus ar gevredigezh-se er c'helaouennoù. Unan eus hec'h amkanioù pennañ er mare-mañ a zo ar stourm evit ur skinwel gwelloc'h e Kembre, muioc'h a lec'h ennañ evit ar c'hembraeg.

D'ar gwener 19 a viz genver o deus pergont ezel eus "Cymdeithas yr Iaith" aloubet e-pad div eurvezh labourvaoù-skinwel Harlech e Kêrdiz (Caerdydd, Cardiff).

War an hevelep deiz ez ae c'hwec'h emsaver all e-pad an abar-daez d'en em sparañ e labourvaoù-skinwel ar B.B.C. he n'eo nemet diouzh ar sul 21 e voent lakaet er-maez gant ar bolis.

#### Dieubidigezh Ffred Ffransis

D'ar gwener 19 a viz genver ivez e voe dieubet unan eus harozed pennañ ar stourm evit ar c'hembraeg, Ffred Ffransis, goude bezañ tremenet 15 mizvezh e toullbac'h Walton, e-kichen Liverpool, e Bro-Saoz.

E miz du 1971 e oa bet kondaonet ar paotr yaouank-mañ (dezhañ 24 bloaz) d'ur bloavezh toullbac'h evit bezañ graet freuz ha reuz e labourvaoù-skinwel Manchester gant emsaverion all eus "Cymdeithas yr Iaith", o stourm evit ur skinwel kembraek. E miz mae 1971 e oa bet kondaonet dija d'ur bloavezh-toullbac'h all, gant goursez, evit bezañ moc'het arouezioù-hent saoznek niverus gant e geneiled e Kembre.

En toullbac'h e stagas Ffred Ffransis da gelenn ar c'hembraeg d'ar brizonidi all.

Pa zeuas er-maez eus an toull-bac'h e oa 300 broadelour o c'hortoz daoust d'an amzer fall ha yen dirak dor an toullbac'h, en ur ganañ kanennoù broadel. Pa voe digoret an nor en diwezh e tarzhas ar youc'hadennoù hag e voe kanet ar ganem vroadel gembreat. An deiz war-lerc'h e reas Ffred Ffransis ur brezegenn e Kêrdiz dirak un engroez bras a dud.

#### Skinwel kembraek

Kregiñ a reas ar skinwel e Kembre e 1952 gant ar B.B.C. hag e



1958 e voe krouet H.T.V. (Harlech Television), ur c'hevredad kenwerzhel. En derou ne oa nemet un nebeut kembraeg ur wech an amzer met sevel a ra bremañ an abadennoù kembraek da 13 eurvezh bep sizhun (B.B.C. + H.T.V.).

En un darn vras eus Breizh-Veur e c'heller tapout dija peder c'hanol skinwel met n'eus nemet teir c'hanol c'hoazh e Kembre hiziv. Setu perak en deus goulennet Gwynfor EVANS, rener ar Strollad Broadel Kembre, d'ar 15 a viz genver 1973, e-kerz ur vodadeg foran, e vefe krouet ur ganol skinwel kembre distag, ennañ ul lec'h bras gouestlet d'ar c'hembraeg.

Kinniget en deus Gwynfor EVANS e vefe skignet gant ar ganol nevez-se 26 eurvezh e kembraeg ha 16 eurvezh e saozneg bep sizhun. Kous-tañ a rafe, hervezañ, war-dro dek milion lur saoz bep bloaz met kellidet e c'hellfe bezañ gant ar B.B.C., Harlech Television hag ar gouarnamant breizhveuriat a-gevret. Ret eo derc'hel kont, hervez Gwynfor EVANS, e c'hellfe bezañ kalz brasoc'h e dalvoudegezh deskadurezhel hag e levezon war vuhez ha sevenadurezh Kembre eget re ur Skol-Veur.

#### Skoazell stadel d'an embann kembraek

Ur skoazell fetis a zegemer bep bloaz an tiez-embann kembraek digant ar pennadurezhioù. Sevel a rae warlene skoazell ar gouarnamant breizhveuriat da 12 500 lur saoz (war-dro 150 000 F) ha gant priz ar vuhez o kreskiñ ez eo bet divizet daougementiñ ar skoazell-se, a savo eta betek 25 000 lur saoz (war-dro 300 000 F) er bloavezh 1973-1974 !

#### Kelennadurezh ar c'hembraeg

Betekhen e oa ar c'hembraeg un danvez-skol ret en darn vuiañ eus skolioù Kembre met emañ ar Sekretourva-Stad evit Kembre o paouez divizout ne vefe mui ar c'hembraeg nemet un danvez-skol diret adalek miz gwengolo 1974 e skolioù izel Kembre.

Taget-taer eo bet an disentez-se gant PLAID CYMRU, ar Strollad Broadel Kembre, en deus degaset da goun, e felle da 66% eus ar Gembreiz, hervez ur sondadur kedveno sevenet nevez'zo, e vefe kelennet ar c'hembraeg d'o bugale. Ha 33% eus ar Gembreiz zoken a hetfe evit o bugale ur gwir zeskadurezh divyezhek. Ne vez roet e gwirionez ur seurt deskadurezh divyezhek nemet da 3,5% eus bugale Kembre, hervez an Ao. Dafydd WILLIAMS, Sekretour ar Strollad Broadel Kembre.

(Notenn: Diskouez a ra an div stlennad diwezhañ-se pegen disheñvel eo stad ar c'hembraeg e Kembre diouzh stad ar brezhoneg e Breizh. Damguzh eo koulz lavaret an embann brezhonek e Breizh hag an darn vuiañ eus hor c'henvroiz ne ouzont ket zoken ez eus levrioù brezhonek ! Evit pezh a sell ouzh kelennadurezh ar brezhoneg n'eus ket 1% eus ar skolidi vreizhat oc'h heuliañ kentelioù brezhoneg er skolioù pe e lec'hioù all ha dister-kenañ e vefe moarvat niver an dud o c'hoantaat un deskadurezh divyezhek evit o bugale.)

Ar vroadelourion gembreat a-enep d'ar feulster

A-viskoazh ez eo bet al lodenn vrasañ eus an emsaverion gembreat a-enep d'ar feulster ha techet kentoc'h d'ar gempennouriezh, dre vras. Evel-just e c'hellfed menegiñ tangwall ar skol-vombezañ e Penrhos, e-kichen Pwllheli e 1936 gant tri emsaver eus PLAID CYMRU met ur jestr arouezel e voe da gentañ penn. Menegiñ a c'heller ivez gwalldaolioù ar "Free Wales Army" (Lu Kembre Dieub) a lakaas bombezennoù niverus da darzhañ er bloavezhioù 60, met ne oa nemet un dornadig tud el luskad amjestr-se ha kondaonet e voe e obererezh gant darn vrasañ ar vroadelourion. Gwir eo c'hoazh hiziv an emzalc'h-se e-keñver ar feulster, d'ar mare ma ra reuz e Norz-Iwerzhon, evel m'en deus hen diskouezet splann ur brezegenn distaget gant Gwynfor EVANS, rener ar Strollad Broadel Kembre (PLAID CYMRU) e Kêrdiz (Caerdydd, Cardiff) d'an 26 a viz genver. Setu da heul ar frazennoù pouezusañ anezhi :

"Gwir eo ar c'hrennlavar "Muioc'h a feulster a dalv nebeutoc'h a reveulzi".

"Iwerzhon a zo ar vro hag he deus bet al levezon donañ war ar vroadelouriezh kembreat en tri rummad diwezhañ. Diskouezet eo bet alies he frankiz evel un anatadur eus berzh ar feulster."

"Dieupoc'h, unvanoc'h hag iwerzhonatoc'h e vije avat Iwerzhon ma vije bet graet gant hentennoù difeuls. E Dispac'hadeg Pask, n'eo ket ar feulster met an emaberzh a zo hollgaer. Degemeret eo bet en Iwerzhon ne oa nemet ar feulster evit bezañ harozel hag efedus ; ne voe den ebet evit kavout abeg er mennoz-se hag ul levezon o deus an dud feuls a c'hell mont betek goleñ an amkanioù gwirion."

"Gant klask ar vroadelezh hag an emrenerezh kembreat ne vez ket didamallet ar feulster rak ur gwallerezh eus personelezh mabden eo bepred. Gant hentennoù difeuls e stourm ar vroadelourion gembreat."

"Gwall-vrudet eo ar vroadelouriezh er c'hantved-mañ. Kemmesket e voe gant an impalaerouriezh, he deus, evel ar faskouriezh, an naziouriezh hag an holl reizhiadoù hollveliek, lakaet ar Stad a-us d'ar Vroad ha ledet beli ar Stad war bobloù ha pinvidigezhioù broioù all."

"An diforc'h bras a oa e plede ar vroadelouriezh gant ar gumuniezh e-pad m'edo an impalaerouriezh oc'h uhelaat ar Stad."

"Evit tud'zo, n'eus goanag ebet evit ar gumuniezh kembraek da dreuzvevañ, hag hi ken bresk, nemet dre implijout ar feulster evit lakaat ur gouarnamant digas da fiñval. Ma talc'h ar gouarnamant da nac'h ouzhimp un emrenerezh demokratel e c'hellfe kreskiñ an niver bihan-se. Hogen ma respont ar gouarnamant da ezhommoù Kembre, e talc'ho PLAID CYMRU ha CYMDEITHAS YR IAITH gant berzh-mat da vleniañ ar vroadelourion war hentoù an difeulster."



### Deiz-ha-bloaz ar sulvezh gwadus e Doire

D'ar sul 28 a viz genver e voe lidet e Doire (Derry) deiz-ha-bloaz ar "sulvezh gwadus" (13 Iwerzhonad a voe lazhet gant an arme saoz warlene d'an 30 a viz genver). Diskouez a reas an I.R.A. "da c'hortoz" pegen kreñv e oa he diazez bepred er boblañs : ouzhpenn 7 000 Republikan a zibunas dre ar straedoù gant banieloù triliv ar Republik Iwerzhonat hag int war lerc'h da gemer perzh en ur vodadeg vras aozet gant ar SINN FEIN e-lec'h ma komzas renerion bennañ an emsav republikan, en o zouez an Itron Maire DRUMM, rener nevez al luskad. Gervel a reas an Iwerzhoniz da zerc'hel gant ar stourm betek an trec'h.

### Mougadur e Suiwerzhon

D'an 29 a viz genver e Dulenn (Baile Atha Cliath, Dublin) e voe kondaonet gant al lez-varn arbennik nevez (o vont en-dro abaoe miz kerzu) Martin MacGuinness, rener an I.R.A. "da c'hortoz" e Doire (Derry) ,n'eus ket pell, da 6 mizvezh toullbac'h evit bezañ ezel eus an I.R.A. D'an hevelep kastiz e voe kondaonet gantañ un emsaver republikan all, Joseph MacCallion e anv. Nac'h a rejont o daou anavezout al lez-varn.

### Poblaters e Norz-Iwerzhon

D'an 8 a viz meurzh 1973 e tle bezañ aozet ur poblaters (referendom) e Norz-Iwerzhon evit goulenn ouzh annezidi ar ranndir hag eñ e fell dezho chom er "Rouantelezh-Unanet" pe en em stagañ ouzh ar Republik Iwerzhonat o tilezel da vat ar "Rouantelezh-Unanet". Ne ouzer ket c'hoazh hag aozet e c'hello bezañ ar poblaters-se en abeg d'ar feulster o tirollañ muioc'h-mui er vro met gouzout a reer dija ne vo ket un darn vras eus an annezidi a orin iwerzhonat ("kattolik" evit ar c'helaouennoù) evit kemer perzh er poblaters-se. Distaolet-groñs eo bet ar poblaters-se gant o aozadurioù politikel, zoken gant ur gostezenn ken kerreizh hag ar "Social Democratic and Labour Party". Boikotet e vo eta gant un drederenn eus ar vouezhierion da vihanañ.

Forzh penaos ez eo gwall siek mennoz ar poblaters-se. Gantañ ne vo graet kammed ebet war du un diskoulm da gudenn Iwerzhon. Ret eo hen adlavarout ur wech c'hoazh : kudenn Iwerzhon a zo kudenn an enezenn en he fezh ha ne c'hello bezañ diskoulmet nemet gant ar perzhiekadur eus holl annezidi an enezenn ha n'eo ket hepken gant tud an norz.

### Un emzalc'h a goust ker

E miz here 1972 e Paris e voe krisoc'h ar varnerion e-keñver Yeun GOURVEZ eget e-keñver izili all an Talbenn-Dieubiñ Breizh ("F.L.B.") dre m'en doa nac'het komz galleg e derou ar prosez ha goulennet ur jubennour.

Bemdeiz en Iwerzhon koulz lavaret (dreist-holl en norz) e vez barnet emsaverion republikan gant al lezioù-barn ha bepred e pakont ar c'hastizoù ponnerañ. Ha setu perak : heuliañ a reont un hengoun republikan kozh ha nac'h a reont anavezout beli ar pennadurezhioù hag al lezioù-barn warno, ken e Norz-Iwerzhon, ken e Su-Iwerzhon. Ent digor e troont kein d'ar varnerion evel pa neviije ket anezho. Ne reont netra evit en em zifenn, evit kinnig un alibi pe zigarezioù skañvaüs ha kondaonet e vezont bepred d'ar c'hastizoù ponnerañ. Evel-se e weler yaouankizoù, seitek pe eitek vloaz hepken, kondaonet da eizh pe zek bloaz toullbac'h hep rannañ grik ...

Pa c'hoarvez gant un tamallad terrif ar reolenn-se ha klask en em zifenn dirak ar varnerion e vez skarzhet diouzh an em-sav republikan evel m'eo c'hoarvezet nevez'zo c'hoazh.

### Dilennadegoù e Su-Iwerzhon

D'an 28 a viz c'hwevrer e vo aozet dilennadegoù hollek er Republik Iwerzhonat rak divodet eo bet an "Dail" (parlamant Dulenn) gant an Tevezeg (Maodiern Kentañ), Jack LYNCH, e derou miz c'hwevrer, dre un taol dic'hortoz, ur bloaz arack an deiziad merket.

En un degouezh politikel diaes evel hini Iwerzhon bremañ n'en doa ket Jack LYNCH ar muiañniver ret evit ren ur politikezh gwirion. Setu penaos e oa dasparzhet 144 sez an "Dail" diwezhañ : 69 sez evit "FIANNA FAIL", strollad ar gouarnamant, 50 evit "FINE GAEL", kentañ strollad an enebadur, ha 17 evit strollad al Labour. Div sez a oa vak ha c'hwec'h kannad ne oant stag ouzh strollad ebet.

Gant ar brud-vat en deus e-touez poblañs Su-Iwerzhon e vag an Ao. LYNCH ar spi da greskiñ niver ar gannaded a-du gantañ. Ezhomm bras en deus eus an trec'h-se ivez arack ur stourm diaes all evit e strollad, dilennadegoù al leviour (prezidant) a-benn un nebeut mizvezhioù pa echuo amzer al leviour kozh Eamon de VALERA.

Emañ ar galloud er riez gant FIANNA FAIL abaoe 1957 met d'ar 6 a viz c'hwevrer o deus FINE GAEL ha Strollad al Labour skoulmet un emglev evit gouarn a-gevret ma teuont a-benn da gaout ar muiañniver o daou a-gevret (evel etre 1954 ha 1957). Renet eo FINE GAEL gant Liam COSGRAVE ha Strollad al Labour gant Brendan CORISH.

Ne gemero ket perzh en dilennadegoù-se ar SINN FEIN "da c'hortoz" rak klozet eo bet e penngarterioù gant ar gouarnamant hag enket eo dibaouez e stourmerion gant ar bolis. Danvez-kannaded a ginnigo avat ar SINN FEIN "kefridiel".

E Bro-Ulad en em ginnigo un den hag a zo a-du gant mennozioù ar Republikaned "da c'hortoz", Neil BLANEY e anv. Kannad eo evit biz Dùn Na nGall (Donegal), dr̃e e-kichen Doire (Derry) met er Republik evel-just, abaoe 1948. Un den a-bouez e voe Neil BLANEY e-pad pell-amzer er strollad FIANNA FAIL : kadoriad er poellgorerounit etre 1948 ha 1951, teñzorier ar strollad etre 1956 ha 1970 ha maodiern teir gwech. E miz mae 1970 e voe rediet avat gant an Ao. LYNCH da reiñ e zilez goude 5 mizvezh cholori politikel da heul un afer a enporzhiadoù-armoù er Republik dre laer (evit ar Republi-



kaned) E miz du 1971 e voe skarzhet eus ar strollad FIANNA FAIL ha kannad "Independent" e voe diwar neuze. Un enebour touet eo da bolitikerezh an Ao. LYNCH.

Gant un den pouezus all e tle bezañ chalet ivez an Tevezeg iwerzhonat, Kevin BOLAND hag en deus krouet ur strollad nevez "Republican Unity Party" (Strollad an Unaniezh Republikan) a ginnigo danvez-kannaded e kontelezh Dulenn (Baile Atha Cliath), e Cabhan (Cavan), e Muineachan (Monaghan) hag e Corcaigh (Cork). Tad Kevin BOLAND a voe unan eus diazezerion FIANNA FAIL e 1926 ha kannad e voe e-unan evit ar strollad-se eus 1957 da 1970. Maodiern e voe zoken er gouarnamant iwerzhonat met reiñ a reas e zilez e 1970 pa voe rediet an AoAo. Charles HAUGHEY ha Neil BLANEY da zilezel ar gouarnamant, evit bezañ skoazellet da enporzhiañ armoù dre laer evit ar Republikaned. N'eo ket a-du Kevin BOLAND tamm ebet gant politikerezh an Ao. LYNCH e-keñver an emsav republikan ha koulskoude edo e-unan er gouarnamant (adalek 1957) pa voe heskinet ha bac'het gant polis ar republik paotred an I.R.A. da vare o ergerzhadeg-sponterezh e Norz-Iwerzhon (1956-1962).

#### Ar stourm broadel en Euskadi

Niverus-tre eo ar c'heleier o tont eus Euskadi (ec'h-welioù, yunoù politikel, taolioù-kaer E.T.A., mougadur, h.a..) met heverk e voe miz genver diwezhañ gant daou zarvoud dreist-holl hag o deus bet un hekleb etrevroadel.

D'an 25 a viz genver 1973 e voe barnet 15 emsaver eus E.T.A. gant kuzul-brezel Bilbao evit bezañ skrapet e miz genver 1972, ur greantelour spagnat, an Ao. Lorenzo ZABALA. Kondaonet eo bet pevar broadelour da gastizoù-toullbac'h ponner (17 vloaz, 15 vloaz, 13 vloaz ha 12 vloaz).

D'ar 16 a viz genver 1973 e voe skrapet gant E.T.A. ur greantelour spagnat all, an Ao. Felipe HUARTE. Ranket en deus e diegezh paeañ 50 milion peseta (3 965 000 F !) d'an aozadur kuzh ha dre ur c'hwelgevrat ez adkemeraz ar c'hevredad renet gantañ 114 micherour a oa bet lakaet er-maez, nebeut amzer a-raok. Kresket e voe goprou an holl vicherourion eus 3 000 peseta bep miz (war-dro 250 F), degaset ar sizhunvezh-labour da 44 eurvezh ha roet d'an holl labourerion ur miz vakañsoù bep vloaz. Lezet e voe an Ao. HUARTE da vont.

Furchet eo bet ur bern tiez e Su-Euskadi ha bac'het broadelourion niverus met betekhen n'eo ket bet adkavet c'hoazh ar skraperion.

#### Aerporzh an Naoned

E 1972 ez eo tremenet 230 000 treizhad dre aerporzh Kastell-Bougon, aerporzh an Naoned (33 000 e 1964), en o zouez 120 000 o veajiñ etre Naoned ha Paris hag ouzhpenn 30 000 etre Naoned ha Lyon. A-benn un nebeut bloavezhioù e vo savet un aerporzh etrevroadel bras en Itron-Varia al Lanneier, da 20 km e biz Naoned, e-lec'h ma c'hellou douarañ nijerezed ramzel dre zazloc'h o tont eus Afrika, Azia pe Amerika.

AR SAVEREZH-LISTRİ

E BREIZH

gant

Jakez ar BIHAN

E derou miz eost 1972 en deus disku-  
liet ar c'hevredad SHELL-France edo o paouez  
urzhiadañ daou eoullistr bras digant "Chantiers  
de l'Atlantique" e Sant-Nazer. Un darvoud a  
bouez bras eo ar c'heloù-mañ evit ar saverezh-  
listri e Breizh ha dre ar bed en abeg da vent  
dreistordinal an eoullistri-se : 540 000 tonnell o  
dalc'had ! Biskoazh n'eo bet gwelet listri ken  
bras. Prest e vo an daou ramz-se da veajiñ dre  
voriou ar bed e dibenn 1976. Degas a raint an tireoul krai eus Plegmor  
Persia betek porzhioù gall Fos, war an arvor kreizdouarel, ha Le Havre,  
e gwalarn Bro-C'hall.

Sebezus a-walc'h eo ment an daou c'hevell-se :  
415 metr o hed, 63 metr o led ha 28,5 m o endouradur (evit un eoullistr  
300 000 tonnell n'eo nemet 346 m e hed, 54 m e led ha 24 m e endouradur,  
pezh a zo dija diaes da grediñ !) Ganto e vo daou stur ha div viñs-tro  
evit ma vint ken aes da vleniañ ha listri kalz bihanoc'h, dezho ur  
viñs-tro hepken. Er c'heflusker e vo div bunellerez (turbinenn) dre  
vurezh, ganto ur galloud hollel 65 000 CV !

Gant an urzhiad-mañ e tizher ur vent evel ma  
n'eus bet gwelet biskoazh gant al listri abaoe derou ar verdeadurezh.  
Un nebeut mizvezhioù abretoc'h en doa roet ar c'hevredad SHELL-France  
an urzh da lakaat war ar stern c'hwec'h eoullistr 275 000 tonnell, pezh  
n'eo ket ken dister-se dija ! E gwirionez e voe urzhiadet dija e 1970  
digant chanterioù Japan, re vrasañ ar bed, tri eoullistr 477 000  
tonnell, a zlefe bezañ moret abaoe un nebeut sizhunvezhioù bremañ.  
Gant urzhiad diwezhañ ar c'hevredad SHELL-France ez a ar maout gant  
chanterioù Breizh bremañ.

Evel-just e savo ur bern kudennoù nevez gant  
ar ramzed-se : ne vo ket al listri, a-us da 400 000 tonnell o dalc'had  
evit tremen dre strizhioù-mor Malaka pe Dover nag evit tremen evel-just  
dre ganolioù Suez, Kiel ha Panama. Bihan-tre e vo niver ar porzhioù a  
c'hello degemer anezho ha rediet e vint peurliesañ da chom en donvor.  
Ha ma c'hoarvez d'unan anezho peñseañ e vo spontus-kenañ ar "mare du"  
da heul !

Un ijinerezh greantel pouezus-tre eo ar save-  
rezh-listri en armerzh brezhon ha gantañ ez eus o vevañ miliadoù ha  
miliadoù a Vreizhiz. Reizh eo pouez ar saverezh-listri en ur vro  
troet war-du ar mor evel Breizh. Arabat deomp en em douellañ avat :  
n'eo ket ar saverezh-listri e Breizh un ijinerezh breizhat ha ne  
vije ket anezhañ hep ar riez c'hall. Disheñvel e vefe an traoù  
moaryat en ur Vreizh dieub met evit ar mare ez eo ar saverezh-listri  
etre daouarn ar C'hallaoued, pe e stumm ar verdeadurezh-brezel gall  
gant hec'h arsanailhoù pe e stumm kevredadoù diazezet o renerezh e  
Paris evel da skouer "Chantiers de l'Atlantique". Gall eo an darn  
vuiañ eus ar sternioù hag eus an ijinourion ha degemer a ra an iji-  
nerezh-se ur skoazell vras digant ar Stad C'hall. Hep ar skoazell-se



ne vije ket mui anezhañ hiziv moarvat da heul kevezerezh bras ar riezoù all.

Gant ar chanterioù he deus e Breizh hag e kreisteiz Bro-C'hall en em gav ar riez c'hall er pempvet renk er bed, pell a-dreñv da Japan, a fard tost an hanter eus an holl listri moret dre ar bed. Diskouez a ra an dregantadoù eus niver al listri savet e 1971 pegen bras eo pouez Japan :

Japan	46,7 %
Sveden	8,1 %
Alamagn	7,1 %
Breizh-Veur	4,9 %
Frañs	4,5 %
Spagn	3,7 %
Norvegia	3,4 %

Diaesterioù bras o deus skoilhet ar chanterioù e Frañs betek kreiz ar bloavezhioù 60 evel m'o deus anavezet diaesterioù bras ivez chanterioù Alba ha Bro-Ulad (Norz-Iwerzhon). Skedusoc'h e seblant bezañ stad an traoù bremañ ha moarvat betek 1985 da vihanañ met kudennoù nevez a savo marteze a-benn pemzek vloaz ha lakaet e c'hello bezañ en arvar micher miliadoù a Vreizhiz ha da heul darn eus armerzh hor bro. Dre ziuver a bersonelezh melestradurel dezhi hec'hanan, n'eo ket Breizh siwazh evit anavezout hec'h armerzh-hi ha ret eo ober peurliesañ gant stlennadoù evit Frañs a-bezh pe dammoùigoù stlenn dastumet amañ hag ahont.

E Frañs e sav kengread (hollad bloaziek ar gwerzhioù) ar saverezh-listri da 2 500 milion lur gall hag e-touez e embregerezhioù pennañ e kaver ur bern hag a zo diazezet e Breizh, o vezañ an hini brasañ "Chantiers de l'Atlantique" e Sant-Nazer, 8 300 den o labourat ennañ . Ret eo menegiñ ivez ar chanterioù Dubigeon-Normandie e Naoned, an "Atelier Français de l'Ouest" e Sant-Nazer, ar S.C.I.C. H.a. e Sant-Malo hag ivez ur bern chanterioù bihan o sevel bigi-diduellañ dreist-holl. Arabat disoñjal ivez chanterioù a-bouez e Breizh, arsanailhoù ar Stad e Brest hag en Oriant, a vez savet enno listri-brezel bras pe vihan. E-kichen ar saverezh-listri e c'heller menegiñ c'hoazh obererezhioù stag outañ evel an adaozañ-listri (o reiñ labour da 1 200 den e Brest hag e Sant-Nazer).

Klaskomp gwelout an traoù a dost diouzh ma c'hellomp ha da gentañ penn arsanailhoù ar Stad. E Brest ez eus bet savet listri bras-tre er bloavezhioù tremenet, an doug-nijerezed "Foch" ha "Clémenceau", ar reder-skol "Jeanne-d'Arc", ar fourgadenn "Duquesne"... En arsanailh Brest e vez implijet 7 500 den ha sevel a ra ar c'hengread da 950 milion lur gall. Ouzhpenn-se e c'heller menegiñ emañ e Brest skolioù an "Direction Technique de la Construction Navale" (Renerezh Kalvezel ar Saverezh-listri) a stumm kalvezourion evit an arsanailhoù-Stad. En arsanailh an Oriant e vez savet listri bihanoc'h evel ar gorvetenn "Aconit" pe ar fourgadennoù "Suffren" ha "Tourville". Implijet e vez 4 000 den en Oriant ha sevel

a ra kengread an arsanailh da 430 milion lur gall. Gant an tiegezhioù hag ar genwerzhourion o labourat evito ez eus eta ouzhpenn 50 000 den o vevañ diwar an obererezh-se. Diskouez a ra kement-se ar stad a sujidigezh trevadennel m'emañ enni hor bro, evel m'eo bet diskuliet meur a wech gant an U.D.B. ha luskadoù breizhat all. N'eo ket an holl labourerion-se o c'hoantaat evel-just disparti ar soudarded c'hall diouzh Breizh hag arsav an dispignoù soudardel. Anat eo e vo diaes hag hir moarvat treiñ an arsanailhoù-se da ijinerezhioù nann-soudardel. Un draen poanuis eo en armerzh Breizh.

Evit luziañ c'hoazh an daolenn e vez savet listri-brezel ivez gant embregerezhioù prevez a-wechoù, evel da skouer gant ar chanterioù Dubigeon-Normandie, a zo o renerezh bras e Paris, ur chanter e Naoned ha tri chanter all e Bro-C'hall. Merkomp amañ e veze anv betek 1968 e Naoned eus "Chantiers de Bretagne" (Chanterioù Breizh) araok d'ar c'hevredad-se kendeuziñ gant Dubigeon-Normandie.

Emañ ar chanterioù prevez e dalc'h kendegeuzh an armerzh er bed. Pa zigresk priz ar fred war ar marc'had-bed, da lavarout eo paz eus re a listri ha paz eo kalz brasoc'h ar c'hinnig eget ar goulenn, ne vez ket kavet urzhiadoù ha ne vez ket lakaet listri nevez war ar stern. En tu gin e vez roet kalz urzhioù-sevel d'ar chanterioù pa seblant skort al lestraz-bed evit ar bloavezhioù da zont. Evel-se e voe diaes stad ar chanterioù e-pad ar bloavezhioù da heul ar brezel-bed diwezhañ nemet a vare da vare hogen abaoe 1968 ez a an traoù war wellaat. Da heul ar brezel etre Israel hag ar riezou arabat e voe serret kanol Suez ha rediet al listri da gorntroiañ ar c'hevandir afrikat evit degas o lestrad tireoul eus plegmor Persia betek Kornog-Europa pe Norzamerika. Kresket en deus kalz ar c'henwerzh dre ar bed ha da c'hortoz diorren ar gremm derc'hanel hag andonioù-gremm all, emañ ar riezou greantel o vezeziñ muioc'h-mui tireoul ha tiraezhenn o tont eus an Trede Bed e lec'h ar glaou, ma voe diazezet warnañ ar Reverzhi C'hreantel er c'hantved diwezhañ. Ret eo sevel eta listri-karg, en o zouez doug-endalc'herioù (un endalc'her pe "container" a zo ur pikolkef implijet muioc'h-mui er c'henwerzh etrevroadel evit buanaat kargañ ha digargañ al listri er porzhioù) evit ar c'henwerzh etre ar riezou greantel, eoullistri hag aezhennlistri (metanerioù da skouer) evit degas an danvezioù-gremm eus an Trede-Bed d'ar bed diorreet. Hag evit izelaat priz-koustañ an dezougerezh e vez lakaet war ar stern listri brasoc'h-brasañ, aezhennlistri etre 35 000 ha 120 000 m<sup>3</sup> o lestrad hag eoullistri betel 540 000 tonell evel re Sant-Nazer ha marteze ur milion tonell a-benn un nebeut bloavezhioù.

Arvaroù a zo bepred evel-just evit dazont ar saverezh-listri : un enkadenn armerzhel vras evel hini ar bloavezhioù 30 a verkfe da skouer un digresk eus an eskemmoù kenwerzhel ha da heul an dilabour er chanterioù. Hiziv daoust ma kresk an eskemmoù ent reoliek e weler bloc'hoù kenwerzhel bras o tiwanañ evel ar C'henvarc'had Europat Bras da skouer, hag enno e vez kaset da benn an eskemmoù dreist-holl dre an douarhentoù hag an houarnhentoù. O keveziñ gant an eoullistri hag an aezhennlistri e kaver ivez an eoulsanioù hag



an aezhennsaniou. Ouzhpenn-se e c'hell ur riez evel Japan bezañ techet da zegemer an holl urzhioù-sevel (en abeg d'he skiant-prenet ha d'he frizioù) ha lezel chanterioù ar riezoù all da grakvevañ ha da vont da get.

Setu perak ez eus ur c'hevezerezh spontus dre ar bed evit ar prizioù hag evit ar c'hred. Ret-groñs eo uhelaat muioc'h-mui ar genderc'husted bep vloaz. Gant ur genderc'husted uhel-tre ez eo deuet a-benn Sveden, da skouer, da gaout eil renk ar bed daoust da c'hoproù uhel-tre d'ar vicherourion e-pad ma chome kalz izeloc'h goprou ar vicherourion japanat. Peurliesañ e c'houleñn c'hoazh ar saverezh-listri kalz tud-labour. E Frañs da skouer ez eo ijinerion ha kalvezerion 15 % eus ar c'hoskor hepken ha 66 % anezhañ a zo micherourion. E 1960 e oa 40 000 den e Frañs o labourat er saverezh-listri met 25 300 hepken e 1970, en o zouez 14 200 micherour, 2 500 micherour arbennikaet, 2 000 tresour hag implijad, ha 6 600 ijinour ha stern. Daoust hag e ti-gresko kalz c'hoazh niver an dud o labourat er saverezh-listri ? Setu an emroadur a zo gortozet er bloavezhioù da zont gant ar pennadurezhioù gall :

	1970	1970-1975	1975-1980
Micherourion	14 200	14 200	15 300
Micherourion arbennikaet	2 500	1 000	500
Tresourion Implijidi	2 000	1 900	2 100
Ijinourion Kalvezourion Sternioù	6 600	6 600	7 600
En holl	25 300	23 700	25 500

Evit echuiñ ar pennad-mañ (a chom diglok-tre diwar-benn ar gudenn vras-se) e ranker lavarout ur wech c'hoazh ez eo dre vras ar saverezh-listri un ijinerezh gall ha ne vefe ket ur Stad Vrezhon evit reiñ d'ar chanterioù ar skoazell a vez roet dezho gant ar Stad C'hall, nemet ez asantfe lakaat en arvar ar peurrest eus an armerzh. Ur pouez re bonner e vefe evidomp. Kement-se n'eo ket un digarez evel-just evit chom diseblant ouzh ar gudenn. Kalonekaüs eo gouzout e vo labour evit micherourion ar chanterioù da vihanañ betek 1980 met ret e vo d'an Emsav resisaat e savboent diwar-benn ar gennad armerzhel-se. En Europa emañ marteze an diskoulm. E Stadoù-Unanet Europa da zont e vefe poellek dasparzhañ al labour etre an izili ha lakaat pep hini d'en em arbennikaat. Gant skoazell ar gouarnamant europat ha dindan gontrol ar gouarnamant brezhon e c'hellfe mont war-raok chanterioù Breizh ha bastañ d'ul lodenn vras eus ezhommoù Europa. Hep mar ebet n'eo ket kement-se evit ar bloaz a zeu !



DIELLOU

GENELIEZH UR C'HOMUNOUR

( Buhezskrid Mao - Tse - Tong )

troet e saozneg gant Edgar SNOW,  
e brezhoneg gant Yann MORVAN

---

Ar prantad broadelour

"E miz mae 1921 ez is da Changhai evit kemer perzh e bodadeg-diazezañ ar Strollad Komunour. C'hoariet e voe ar rolloù pouezusañ en aozadur anezhañ gant Ch'ên Tou-hsiou ha Li Ta-chao, a oa o daou e-touez skedusañ kefredourion Sina er mare-se. Dindan Li Ta-chao, pa oan skoazeller-levraouegour e Skol-veur Vroadel Peking, e oan en em droet buan war-đu ar varksouriezh ha Ch'ên Tou-hsiou ivez en doa bet ul levezon warnon evit va heñchañ war an tu-se. Gant Ch'ên em boa breutaet diwar-benn al levrioù marksour am boa lennet ha trivliet don e oan bet gant ar feiz marksour a embanne Ch'ên, da vare va eil beaj da Changhai, en ur prantad a voe diskoulmus moarvat em buhez."

"Ne oa nemet un Hunanad all o kemer perzh er vodadeg istorel-se e Changhai. E-touez ar berzhidi all e oa Chang Kouo-t'ao, Pao Houi-cheng ha Chou Hou-hai. Holl a-gevret e oamp daouzek. E miz here da heul e voe frammet skourr rannvroel kentañ ar Strollad Komunour en Hunan ha dont a ris da vezañ un ezel anezhañ. Diazezet e voe ivez aozadurioù e rannvroioù ha keodedoù all d'ar mare-se. E Changhai e oa er Poellgor-kreiz Ch'ên Tou-hsiou, Chang Kouo-t'ao (a zo bremañ gant Pevare Luoz Ruz an Talbenn), Chen Koung-po (bremañ un amaezhiad uhel e Nanking), Soun Youan-lou, Li Han-tsen (lazhet e Wouhan e 1927), Li Ta (drouklazhet diwezhatoc'h) ha Li Soun. E-touez an izili en Houpeh e oa Teng Pi-wou (bremañ kadoriad eus skol ar Strollad Komunour e Pao An), Hsou Pei-hao ha Ssou Yang. E skourr Chansi e oa Kao Choung-you hag un nebeut renerion-studierion vrudet. E Peiping e oa Li Ta-chao (drouklazhet diwezhatoc'h), Teng Soung-hsia, Chang Kouo-t'ao bremañ bez-kadoriad ar c'huzul soudardel ruz), Lo Chang-loun, Lou Jen-ching (bremañ un trotskiour anezhañ) ha re all. E Canton e oa Lin Pai-ch'ou (bremañ kefridiad ar c'hellidù er gouarnamant soviedel) ha P'eng Pai (lazhet e 1927). E-touez an diazezerion eus skourr Chantoung e oa Wang Chin-mei ha Teng En-ming."

"E-keit-se e oa bet aozet ur Strollad Komunour Sinaat e Bro-C'hall gant darn eus al labourerion-studierion eno, ha diazezet e oa bet hogos dres p'edod o kregiñ d'hen aozañ e Sina. E-touez diazezerion ar Strollad eno e oa Chou En-lai, Li Li-san ha Chang Chen-you, gwreg Tsai Ho-chêng, anezhi ar vaouez nemeti e-touez an diazezerion. Lo Man ha Tsai Ho-chêng a oa diazezerion all eus ar skourr gall. En Alamagn ivez e voe aozet ur strollad sinaat met un nebeut diwezhatoc'h : e-touez e izili e oa Kao You-han, Chou Teh (bremañ pennrener an Arme Ruz) ha Chang

Cheng-fou (kelenner bremañ e Skol-veur Tsinghoua). E Moskov e voe diazezet ur skourr all gant Ch'u Ch'iou-pai ha re all hag e Japan unan all gant Chou Fou-hai."

"E miz mae 1922, en doa aozet dija Strollad Hunan, a oan neuze ar sekretour anezhañ, ouzhpenn ugent c'hweluniad, e-touez ar vengleuzierion, labourerion an houarnhentoù, implijidi ar c'hêrioù, micherourion ar moulerezh ha labourerion ar moneizlec'h. Er goañv-se e krogas al labourerion gant un emsav nerzhus. D'an ampoent-se e oa kreizennet labour ar Strollad Komunour dreist-holl war ar studierion hag ar vicherourion ha ne veze ket graet kalz tra e-touez ar gouerion. Frammet e oa an darn vrasañ eus ar vengleuzierion ha koulz lavaret an holl studierion. Bez e voe emgannoù niverus war-un-dro war dalbenn ar studierion ha war dalbenn al labourerion. E-pad ar goañv 1922 e c'hourc'hemennas Chao Hêng-t'i, anezhañ gouarnour Hunan, lakaat daou vicherour hunanat d'ar marv, Houang Ai ha Pang Youan-ch'ing, ha da heul e krogas un tousmac'h bras a-enep dezhañ. Houang Ai, unan eus an daou vicherour lazhet, a oa rener ur c'hweluniad eus an tu dehou, diazezet e-touez studierion ar skol-c'hreantel hag enebañ a rae ouzhimp ; en degouezh-se avat ez ejomp d'o skoazellañ, hag e kalz stourmoù all c'hoazh. Levezon o doa ivez an anarkourion war ar c'hweluniadoù, a oa frammet holl e-barzh Sindikad al Labour evit Hunan a-bezh. Met treuzvarc'hata a raemp ganto ha dre emzivizoù e virjomp outo da gas en-dro kalz oberoù didalvoud ha savet war ar prim."

"Evit reiñ skoaz da aozañ an emsav a-enep da Chao Hêng-t'i e voen kaset da Changhai. Dalc'het e voe Eil Kendalc'h ar Strollad e Changhai e-pad ar goañv-se (1922) hag e klaskis kemer perzh ennañ. Disoñjal a ris koulskoude anv al lec'h ma oa ar c'hendalc'h da vezañ dalc'het ennañ; ne voen ket evit kavout kamaladed all hag e tremenis e-biou dezhañ. Distreiñ a ris da Hunan ha gant nerzh-youl e kasis war-raok al labour er c'hweluniadoù. E-pad an nevez-amzer-se e tarzhas kalz ec'h-welioù evit goprou gwelloc'h, ampegadoù gwelloc'h hag evit lakaat ar c'hweluniadoù da vezañ asantet ent kefridiel. Darn anezho a reas berzh. D'ar c'hentañ a viz mae e voe embannet un ec'hwel hollek en Hunan ha merkañ a reas kement-se berzh-mat un nerzh evel ma ne oa bet gwelet biskoazh arak en emsav al labourerion sinaat."

"E 1923 e voe dalc'het Trede Kendalc'h ar Strollad Komunour ha kemeret e voe an disentez istorel da emezelañ er C'houomintang, da genlabourat gantañ ha da grouiñ un Talbenn Unvan a-enep da soudardelerion an norz. Mont a ris da Changhai ha labourat e Poellgor-Kreiz ar Strollad. E-pad an nevez-amzer da haul (1924) ez is da Ganton hag e kemeris perzh e Kendalc'h Broadel Kentañ ar C'houomintang. E miz meurzh e tistrois da Changhai hag e labouris war un dro e poellgor-erounit ar Strollad Komunour hag e poellgor-erounit ar C'houomintang e Changhai. Izili all ar poellgor a oa neuze Wang Ching-wei (a voe diwezhatoc'h penn ar gouarnamant e Nanking) hag Hou Han-min, a labourer gantañ da genurzhiañ diarbennoù ar Strollad Komunour hag ar C'houomintang. En hañv-se e voe krouet Akademiezh Soudardel Whampoa. Dont a reas Galen da vezañ ar c'huzulier anezhi ; degouezhout a reas kuzulierion soviedel all o



tont eus Rusia ha stagañ a reas an englev Kouomintang-Strollad Komunour da vezañ mui-ouzh-mui un doare emsav dispac'hel evit ar vroad a-bezh. Er goañv-se e tistrois da Hunan evit diskuizhañ. Klav e oan deuet da vezañ e Changhai, met e-pad m'edon en Hunan ez aozis ar greizenn eus emsav bras ar gouerion er rannvro-se."

"Gwechall n'em boa ket empennet mat an doare eus ar stourm etre ar renkadoù e-touez ar gouerion met goude Darvoud an 30 a viz mae (1925) hag e-kerz ar wagenn vras a obererezh politikel a heulias anezhañ e teuas kouerion Hunan da vezañ oberiant-tre en emsav. Dilezel a ris va zi, e-lec'h ma oan bet o tiskuizhañ hag e stagis gant un ergerzh-frammañ ar gouerion. A-benn un nebeut mizvezhioù hor boa savet ouzhpenn ugent c'hweluniad kouerion hag atizet kounnar ar c'hourferc'henned, a c'houlennas groñs e vijen toullbac'het. Kas a reas Chao Hêng-t'i soudarded d'am zapout hag e tec'his da Ganton. Erruout a ris eno dres d'ar mare m'edo studierion Whampoa o paouez faezhañ Yang Hsi-ming, soudardelour Yunnan ha Lou Tsoung-wai, soudardelour Kwangsi, ha troet e oa an holl e kêr hag er C'houomintang da welout an traoù war o zu mat penn-da-benn. "Nvet e oa bet Tchiang Kai-chek da rener an Arme Kentañ ha Wang Ching-wei da gadoriad ar gouarnamant, ha heul marv Sun Yat-sen e Peking."

"Dont a ris da vezañ pennskrivagner ar Sizhunieg Politikel ur gelc'hgelaouenn embannet gant kevrenn bolitikel ar C'houomintang. C'hoari a reas ar gazetenn-mañ diwezhatoc'h ur roll oberiant-kenañ dre dagañ ha divrudañ askell dehouat ar C'houomintang, renet gant Tai Chi-t'ao. Fiziet e voe ivez ennon stummañ frammataerion evit emsav ar gouerion hag e savis evit se ur rummad kentelioù a voe heuliet gant dileuridi eus 21 rannvro disheñvel, en o zouez studierion eus Mongolia-Diabarzh. Nebeut amzer goude ma voen deuet da Ganton en em gavis rener rann an Agitprop (birvilherezh-bruderezh) er C'houomintang ha danvez-ezel evit ar Poellgor-kreiz. Lin Pai-ch'ou a oa neuze e penn rann ar gouerion er C'houomintang ha T'an P'ing-chan, anezhañ ur c'homunour ivez, a oa e penn rann ar vicherourion."

"Edon o skrivañ muioc'h-mui hag oc'h embreger kiriegezhioù a-ziforc'h e labour ar Strollad Komunour e-touez ar gouerion. War ziazez va studi ha va labour-frammañ ar gouerion en Hunan, e skrivas daou flemmskrid, unan e ditl Un dezrann eus renkadoù disheñvel ar gevredigezh sinaat hag egile e ditl Diazez-renkad Chao Hêng t'i hag an amkanioù dirazomp. Enebiñ a reas Ch'ên Tou-hsiou ouzh ar mennozioù displeget er skrid kentañ a gase betek ar penn pellañ politikerezh ar glad hag a erbede frammañ start ha nerzhus ar gouerion dindan renerezh ar Strollad Komunour. Hag eñ da nac'h e embann er c'helaouennoù komunour-kreiz. Moulet e voe diwezhatoc'h e Mizieg ar Gouerion e Canton hag er gelc'hgelaouenn Choung Kuo Ch'ing-nien (Yaouankiz sinaat). An eil skrid a voe embannet e stumm ur flemmskrid en Hunan. War-dro ar mare-se e stagis da enebañ ouzh politikerezh koulzelour ha dehouat Ch'ên ha nebeut-ha-nebeut ez ejomp war bellaat pep hini diouzh egile, daoust ma ne dizhas ket ar stourm etrezomp e varr uhelañ araok 1927."

(da genderc'hel)

---



AN DANVEZ-KANNADED "BREIZHAT" DA ZILENNADEGOU AR 4 A VIZ MEURZH 1973

22 - AODOU-AN-HANTERNOZ

- |               |  |
|---------------|--|
| 1) Sant-Brieg | Gervais GAUTIER (SAV)                  |
| 2) Dinan      | Yann FOUERE (SAV)                      |
| 3) Loudieg    | Alain CHAPEL (SAV)      Guy CARO (PSU) |
| 4) Gwengamp   |  |
| 5) Lanuon     |  |

29 - PENN-AR-BED

- |                 |   |
|-----------------|---|
| 1) Kemper       | Jean-Marie LE CALVEZ (SAV)                      |
| 2) Brest        | Jean-Yves BIZIEN (SAV)      René L'HOSTIS (UDB) |
| 3) Landerne     | Patrick DORVAL (UDB)      Pierre CADALEN (SAV)  |
| 4) Montroulez   | Jean NICOL (SAV)                                |
| 5) Lesneven     |   |
| 6) Kastellin    |   |
| 7) Pont-e-Kroaz |   |
| 8) Kemperle     | Guy FLEGEOT (SAV) (diskleriet dizilennadus)     |

35 - IZOL-HA-GWINUN


- |                 |  |
|-----------------|--|
| 1) Roazhon-Norz | Patrick COUE (SAV)                         |
| 2) Roazhon-Su   | Jacques DAVID (UDB)      René GORVAN (SAV) |
| 3) Gwizhurig    |  |
| 4) Redon        | Pierrig GUERINEL (SAV)                     |
| 5) Felger       | Doktor VASSEUR (SAV)                       |
| 6) Sant-Malo    | It. Annaig ROY (SAV)                       |


44 - LIGER-ATLANTEL

- |                  |   |
|------------------|---|
| 1) Naoned-Reter  | Jean-Claude RIVALLAIN (SAV)                 |
| 2) Naoned-Kornog | Lionel DIVARD (SAV)      Alain TASSEL (UDB) |
| 3) Boue          | Lucien DIVARD (SAV)                         |
| 4) Ansiniz       | It. Liane SURZUR de LOBEL (SAV)             |
| 5) Kastellbriant | It. Jeannine GOUEZ (SAV)                    |
| 6) Sant-Nazer    | Alexandre LE FUR (SAV)                      |
| 7) Gwenrann      | Michel BARRE (SAV)                          |
| 8) Pembo         | Pierre MANAC'H (SAV)                        |

56 - MORBIHAN

- |                |  |
|----------------|--|
| 1) Gwened      | Robert DERRIEN (SAV)                       |
| 2) Porzh-Loeiz | Paulin JENOT (SAV)                         |
| 3) Pontivi     |  |
| 4) Plouarzel   | Loik CAMUS (SAV)                           |
| 5) An Oriant   | Alain RAUDE (SAV)                          |
| 6) Henbont     | Henri PUNGIER (SAV)      Yvon EVENOU (UDB) |







Notenn diwar-benn RENE LEVESQUE

Goude marv Maurice Duplessis c'hoarvezet e 1959, hag en doa renet ar vro dibacuez abaoe 1944 gant ur graban dir, e voe aozet dilennadegoù e 1960 hag an trec'h a yelas gant ar Strollad Frankizour renet gant Jean Lesage, ha gant al lugan-mañ : "Ret eo kemm an traoù"! Buan-tre e kemmas an traoù e Bro-gebeg e gwirionez dindan al levierezh frankizour eus 1960 da 1966 ha badezet e voe ar prantad-se "Ar Reverzhi Sioul". Dilennadegoù all a voe aozet e 1962, ma voe kreñvaet c'hoazh war o lerc'h nerzh ar Frankizourion, ganto al lugan nevez-mañ : "Mistri en hor Bro !".

E 1960 ivez e teuas an disrannouriezh da vezañ un nerzh sirius er vro. D'an 10 a viz gwengolo e voe krouet ar "Rassemblement pour l'Indépendance Nationale" (Bodadeg evit ar Frankiz Vroadel), hag eñ ar strollad disrannour kentañ e Bro-Gebeg, gant un tregont broadelour bennak. Da geñver an dilennadegoù aozet e mezheven 1966 e kinnigas danvez-kannaded hag en devoe an tu d'implijout ar skingomz hag ar skinwel. Dastum a reas evit an taol kentañ 8 % eus ar mouezhioù, dreist-holl e touez ar rummadoù yaouank. (E 1966 e save an oad keitat er strollad disrannour da 30,5 vloaz!)

Er gouarnamant frankizour renet gant Jean LESAGE e oa ur maodiern yaouank, René LEVESQUE e anv, a oa a-du krenn evit stadelaat ar rouedadoù-tredan prevez ha lakaat Bro-Gebeg da vezañ mestr war he finvidigezhioù naturel.

Araok mont er gouarnamant frankizour e oa bet René Levesque ur c'hefredour distag, brudet-tre evit e abadennoù-skinwel. Ne oa ket Jean Lesage ha darn vras eus ar veodierned all kement-se a-du gantañ net "rediet" e voent kouls lavaret gantañ da stadelaat an tredan e Bro-Gebeg ha da heul ar berzha reas an ober-se e tennas Lesage ar brud-mat anezhañ diouzh e du. Da c'houde e voe René Levesque maodiern an tiegezh hag e soñj e oa kempenn penn-da-benn reizhiad ar c'hedskor pa voe trec'het ar Strollad Frankizour en dilennadegoù e 1966. Distreiñ a reas an Unaniezh Broadel d'ar galloud, dindan renerezh Daniel JOHNSON ( daoust dezhi dastum nebeutoc'h a vouezhioù eget ar Frankizourion !)

Bras-tre e oa (ha brasoc'h eo hiziv moarvat) brud René Levesque e-touez ar re yaouank ha tud an tu kleiz (nemet an tu kleiz pellañ a sell outañ evel ur c'hempennour). Dija p'edo er gouarnamant e tiskoueze emzalc'h

ur broadelour, o tisplegañ e oa "ar Ganadiz, is-Amerikaned hag ar Gebegiz, is-is-Amerikaned". Rebec'h a rae ouzh saoznegerion Vro-Gebeg da vezañ "di-chek ha diouiziek" hag aliañ a rae dezho "dilezel o zemz-spered rodeziat keit ha ma oa poent c'hoazh". E miz c'hwevrer 1964 pa oa Naodiern c'hoazh, en doa diskleriet d'an New-York Times : "Ni a gav deomp e c'hellomp en em zibab gwelloc'h hep ar C'hanada eget ne c'hell ar C'hanada h'pdomp". Ne oa ket deuet da vezañ disrannour da vat c'hoazh ha kavout a rae dezhañ e vefe ar pep gwellañ evit Kebeg ha Kanada bezañ daou riez kevredet . Emdreiñ a reas buan ar gudenn vroadel e Bro-Gebeg e dibenn ar bloavezhioù c'hwegont ha diskouez a reas muioc'h-mui politikourion ar Strollad Frankizour ne oant ket ken disheñvel-se eus o ebeberion evit plediñ gant kudenn Gebeg. Setu perak e kemeras René Levesque penn ur strollad nevez, o vodañ an holl vroadelourion gebegat didaer, koulz lavaret, ar "Strollad Kebegat". Sellet e vez ouzh René Levesque evel ur politikour ampart-tre, gouest da ren ar c'hoari diaes-tre evit kas da vat frankiz e vro hep kas da get hec'h armerzh ha terriñ an holl zarempredoù gant ar broioù amezek. Kavet hon eus e vefe dudius evit lennerion Imbourc'h anavezout e zielefnadur eus ar gudenn vroadel gebegat.

§ § § § § § § § § § §

G.S.

Tennet eo ar stlennadoù-mañ diwar-benn René Levesque eus al levr :  
Le Canada Français après deux siècles de patience gant ur c'hebegat, an  
Ao. Gerard Bergeron.

Dudius eo lenn ivez Bro-Gebeg e kroaz an hentoù gant Alan Tibault (al  
Liamm Nn 153 gouere-eost 1972 pajenn 307).

Kevredel eo Bonreizh Kanada ha kavout a reer war un dro ur gouarnamant hag ur parlamant kevredel en Ottawa, ha gouarnamantoù ha parlamantoù rannvroel er "rannvroioù" evel Bro-Gebeg. Ne fell d'ar vroadelourion stourm nemet war an dachenn gebegat. Setu perak n'en deus ar Strollad Kebegat kinniget danvez kannad ebet en dilennadegoù hollek diwezhañ d'an 30 a viz here 1972. Ne fell ket dezhañ kas kannaded da Vreudoù Ottawa met kemer ar galloud e Bro-Gebeg. Emañ o prientiñ an dilennadegoù rannvroel a vo aozet moarvat e derou 1974.

KLAOUSTRE BRO-GEBEG.

René LEVESQUE

Pennad savet e 1971

troet gant Yann MORVAN.

\*

\* \* \*

Evit Bro-Gebeg e verkas ar bloaz 1970 derou an degad-bloavezhioù ma teuio a-benn ur gumuniezh, enni c'hwec'h milion annezad, da c'hounit he frankiz politikel evit dont da vezañ an eil riez galleger er bed, pe a yelo da gendeuziñ da vat er stroll kanadat en ur zegemer hepken reoladur ur bi-hanniver gouennel. An darvoudoù c'hæarvezet e-kerzh ar bloavezh tremenet, dreist-holl dilennadegoù hollek miz ebrel hag an enkadenn bolitikel degaset e miz here gant an Talbenn-Dieubiñ Kebegat, a ziskouez mat ne c'hello ket an diskoulm bezañ ampellet kalz. Fellout a rafe din spisant da gentañ ster an darvoudoù nevez-se evit klask da c'houde spisverkoù e-sell da raktresañ hor stourm da zont.

Dellezout a ra disoc'hoù an dilennadegoù hollek dalc'het d'an 29 a viz ebrel 1970, bezañ degaset da goun ent berr : faezhet kriz e voe strollad ar gouarnamant, an "Union Nationale" (Unaniezh Broadel) ha gwelout a reas niver e gannaded o tremen eus 50 da 17 hag e dregantad eus ar mouezhioù o tiskenn eus 41 % da zindan 20 %; trec'h e voe ar Strollad Frankizour (hag eñ kevredelour) maz eas gentañ 72 kannad gant 45 % hepken eus ar mouezhioù (da lavarout eo 2 % nebeutoc'h eget d'an dilennadegoù kent) ; ur c'hresk sebezus a reas ar Strollad Kebegat (hag eñ disrannour), a yelas gentañ 7 sez hepken er Breuoù, en arbenn d'un didroc'hañ warlerc'hiet, daoust dezhañ bezañ dastummet 24 % eus ar mouezhipù ; un nebeut berzh a reas ivez ur strollad nevez eus an tu dehou, ar "Ralliement Creditiste" (Adstrolladur Kredourel) (hag eñ kilstourmer) o tastum 12 kannad gant 11% eus ar mouezhioù.

Gant an dilennadegoù-se e seblant bezañ bet adstummet ar menno-zioù politikel. Diskouezet o deus e gwirionez un digresk e brud an daou strollad hengounel (eus 1962 da 1970 e tremenas dregantad ar mouezhioù dastummet gant an Unaniezh Broadel eus 42,1 % da 19,8 % hag hini ar Strollad Frankizour eus 56,4 % da 45 %). Degaset o deus ouzhpenn-se un adstrolladur eus ar saoznegerien hag eus an holl dud enbroet nevez'zo en-dro d'ar Stroll-



lad Frankizour o kreñvaat an diforc'hioù etre ar c'hallegerion hag ar re all. Diskouezet o deus direizhder ur reizhiad dilennadegel, en deus roet an tu d'ar strollad er galloud da zastum dek gwech muioc'h a gannaded eget ar Strollad Kebegat gant nebeutoc'h eget an daougementad eus ar mouezhioù (hep menegiñ an troioù kamm hag an direizhderioù a voe prouet diwezhatoc'h dirak al lezioù-barn). A-drugarez dezho ez eo deuet kalz fraeshoc'h an diforc'h etre dalc'hidi ar gevredalouriezh kanadat ha dalc'hidi an disrannelezh kebegat.

Digor eo an hent e Bro-Gebeg war-du kemeridigezh peoc'hiek ar frankiz dre hentenoù demokratel abaoe an 29 a viz ebrel 1970. Adalek e emgann gentañ ez eo deuet ur strollad politikel frammet-mat, kellidet gant e izili hepken ha gouest da atizañ un treflamm evel ma n'eo bet gwelet bis-koazh, e-touez ar re yaouank hag ar re n'int ket ken yaouank-se, da vezañ an eil strollad eus ar vro evit e bouez politikel hag an nerzh-enebiñ kentañ ouzh ar renadur. Disteraet eo bet siwazh sked an trec'h-se gant direizhder ar reizhiad dilennadegel ha broudet eo bet tud dihabask zo da goll fiziañs e brizhdilennadegoù a-du gant an dud er galloud. E-touez an dud-se e voe tutet sponterion an diskar-amzer.

#### Obererezh feuls an F.L.Q. (T.D.K.)

D'ar 5 a viz here 1970 evoc skrapet gant ur gellig eus an Talbenn Dieubiñ Kebegat ( Front de Libération du Québec) ar c'hargad kenwerzhel breizhveuriat e Montreal, James R. Cross ha goulennet e voe ouzh ar gouarnamant, e touez traoù all, embann ur manifesto politikel ha dieubiñ 23 ezel eus an T.D.K. bac'het evit taolioù-sponterezh, en eskemm gant e vuhez. A-du e voe ar gouarnamant (kevredel) evit plegañ d'ar goulenn-kentañ met nac'h a reas sentiñ ouzh an eil. Ur sizhunvezh war-lerc'h e voe skrapet gant ur gellig all eus an T.D.K., maodiern kebegat al Labour hag ar Boblañs-labour, Pierre LAPORTE, hag adarre e voe savet goulennoù ar gellig kentañ. Goude bezañ digoret an nor da vrentadennoù ez eas war gil un nebeut amzer goude ar gouarnamant rannvroel, da heul "linenn daer" ar gouarnamant kevredel, ha goulenn a reas outañ kas al lu ha dreist-holl embann al lezenn-vrezel er vro. O gourdrozoù a gasses da benn ar sponterion ha lazhet e voe ganto ar maodiern LAPORTE. Evit pezh a sell eus James CROSS, dieubet e voe a-benn ar fin ha lezet e voe ar skraperion da dec'hout da Guba.

Adalek deiz kentañ o sevenedigezhe voe anat o dije torfedoù an T.D.K. heuliadennoù hirdermen war emdroadur ar gevredigezh kebegat, ken en abeg d'o fouez o-unan, ken en abeg d'an degcuezh politikel ha kevredigezhel ma c'hoarvezent ennañ. Evit ar wech kentañ marteze en em gav rediet evit gwir ar gevredigezh kebegat d'ober meur a zibab buhezegzhel diazezel : dou jañs evit buhez mabden pe "raison d'Etat" ( pennabeg Stad), feulster dispac'hel pe nerzh an urzh. Da heul e voe diforc'het fraesoc'h ar mennoziou etre an tu dehou hag an tu kleiz, en un doare un tamig kalvezadel marteze met arcuezius memestra, da lavarout eo un enebadur splann etre dalc'hidi ar pennabeg Stad hag an Urzh hag ar re a zeue evito buhez mabden arack pep tra hag a oa a-du gant an dieubidigezh hiniennel hag an ezhomm a dreuzfurmañ buanoc'h ar gevredigezh.

Ar c'hilstourm " law an order" (1)

Daoust ma n'eo ket scuezhus gwelout ar gouarnamantoù peurliesañ a-du gant an urzh hag al lezenn e vije bet tu da c'hortoz un doare emziouer a-berzh gouarnamant Trudeau en Ottawa hag a-berzh gouarnamant Bourassa e Kebeg. Arack dont e penn ar gouarnamant kanadat ha c'hoazh goude en doa en em ziskouezet Pierre Trudeau evel difenner ar frankizioù hiniennel. Diouzh e du en doa diskouezet Pierre BOURASSA ent foran e-kerzh an enkadenn, c'hortoù treuzwarc'hata, a glote mat gant an dudenn frankizour anezhañ. Siwazh e voe merket kilstourm ar gouarnamant er c'hontrol gant ur feulster divuzul : galv d'al lu, embann al lezenn-vrezel, bac'hidigezh ouzhpenn 450 den, hag ouzhpenn 3 000 ti furchet hep lizher-aotre evit damgreoù hepken. E-pad meur a zevezh e voe bac'het an holl hiniennoù harzet, hep kaout an aotre da gejañ gant o c'herent hag o mignoned na da zegemer skoazell ur breutaour. En tu all d'an holl lezennoù e voent rediet da vezañ luc'hskeudennet ha da reiñ louc'h o bizioù. Ouzhpenn 400 anezho a voe dieubet a-benn ar fin hep an disterañ tamall, peurliesañ goude ur goulennataerezh didalvoud, hep reiñ dezho an disterañ digoll evit ar saotradur gouzañvet gant o brud hag ar c'holl en o goprou. Darn anezho o c'houzañvas zoken boureviadurioù korfel pe amlegoù bac'hidigezh divoas ha dizegemeradus. Ne c'hell bezañ komprenet ur c'hilstourm ken dreistmuzul a-berzh aotrouniezhoù ar gouarnamant nemet ma vez staget ouzh an enkadenn donoc'h a sko Bro-Gebeg abaoe un dek bloavezh bennak. (1)- e saozneg en destenn ( = lezenn hag urzh).

Rak arouezius-kenañ eo ur seurt emzalc'h eus gouarnamantoù a sant diazezoù o beli o steuziañ dindan o daoudroad. Diouzh ur savpoent kevredadoniezhel e ranker klask andon ar sponterezh kebegat e degouezh ar gevredigezh kebegat, lec'h m'en em gav bountet ar c'hallegerion muioc'h-mui war ar vevenn anezhi. Dilabour eo un dekvedenn a labourerion ; diwar ar c'hedskor e vev un dekvedenn eus ar boblañs ; e daouarn estren emañ an nav dekvedenn eus an ijinerezhioù greantel, endarn vrasañ eus an ombregerezhioù bras n'eus ket tu d'ober gant ar galleg, n'eus nemet 10 % eus an enbroerion nevez a gas bugale d'ar skolioù gallek, an holl stolloù gouennel pe dost a zo ganto korvoderioù uheloc'h. Ne c'hell ur seurt degouezh nemet atizañ un emskiant arallekadur a laka en arvar an holl ensavadurioù a-vremañ, reizhder ar veli hec'h-unan ha reizhder an dud a ra ganti. Dre maz intivez spontet e kred al levierion gwelout e pep lec'h azonoù un dispac'hadeg war-nes tarzhañ.

Met war an dachenn bolitikel dreist-holl ez eo c'hoariet an abadenn. Amjestr e c'hell hañvalout bezañ an disoc'hoù eus dilennadegoù miz ebrel : evit ar re a zo mall bras-bras warno ez eo ur faezhidigezh ha diskouez a ra ur wech evit mat ne c'hell ket hent an dilennadegoù bezañ sellet outo evel un hentenn-dieubiñ ; evit ar gouarnamantoù ez eo er c'hontrol trec'h ar gevredelzh evel-just met ivez azon un arackadenn "emrenelour" a zle bezañ harzet an abretañ ar gwellañ. Pa stagas ar re gentañ d'ober gant ar sponterezh evit buanaat red an traoù, e reas o mad ar re all eus an degouezh-se evit diskouezh o nerzh ha dedennañ dindan askell warezus al lu hag ar bolis ar geodedourion o doa spontet o-unan dre c'hwezhañ braster ar gourdrouz. O fal a zo liammañ e spered ar bobl ar "statu quo" gant an diogelroez diouzh un tu hag ar gemmadenn bolitikel gant ar feulster diouzh an tu all. N'eo ket gwall nevez ur seurt kadoniezh.

Renet eo ar c'hoari gant ar gouarnamant kevredel.

Heuliadenn gentañ an enkadenn a voe eta splannaat andiforc'hioù mennozioù ha war un dro adframmañ ar c'herentiezhoù politikel. Evit ar mare da vihanañ e verzer en deus klasket repu ar spered demokratel e-touez an "emrenerion" e-pad m'eo bet aloubet kamp ar gevredelourion gant ar spered hollvestroniel. Ken anat eo an dra-se, er maez eus Bro-Gebeg, ma kaver evit ar wech kentañ an tu kleiz kanadiat o tostaat eus ar Strollad Kebegat



betek ar poent na seblant war-nes degemer e dezennoù "emrenelour".

Un heuliadenn all eus an enkadenn-se a voe gwanaat en un doare spontus ar gouarnamant kebegat, dreist-holl en e zarempredoù gant ar gouarnamant-kreiz. Abaoe an nevezadur kevredigezhel ha politikel a renas e Bro-Gebeg er bloavezhioù c'hwegont e marevezh ar "Reverzhi Sioul" e chome ar pal kentañ krouiñ ur gouarnamant kreñv ha gouest da ren evit mat an diorreadur kebegat. Ouzh en em ziskouez evel difennour pennañ ar Ganadiz galleger e klaskas ar gouarnamant kebegat, kemont ha ma c'helle hen ober er framm kevredel, choari a-zevri ur roll a-ziforc'h koulz en diabarzh hag en diavaez. Enket gant ar frammoù kevredel e c'houlennas hag e tizhas kempennoù don er vonreizh kanadat gant ar spi da zegemer ar galloudoù dreist, en doa ezhomm anezho evit gwalc'hañ ezhommoù e geodedourion. E-pad an enkadenn avat ez eas da get ar spioù-se. Splann e teuas da vezañ e oa renet ar c'hoari evit gwir gant ar gouarnamant kevredel er mareoù diaes. Gantañ e veze kontrollet al lu ha gantañ hepken e c'helle bezañ kemeret diarbennoù mallus. Ne oa nemetañ evit gallout dieubiñ prizonidi bac'het en ensavadurioù kevredel hag evit reiñ dezho an actre da guitaat ar vro. Ne oa nemetañ evit kaout beli e gwirionez war ar skingomz hag ar skinwel. Daoust ma oa dreist-holl ur gudenn gebegat, e oa ar gouarnamant kanadat kevredel hepken a c'helle kinnig diskoulmoù. Zoken m'en dije fellet d'ar gouarnamant kebegat oberiañ en doare all, n'en dije ket gallet, tamm ebet. Didalvoud eo a-benn ar fin gouzout hag eñ en deus klasket ken ober pe nann; trenk eo ar rendael war ar gudenn-se, rak da betra e talv e gwirionez termenañ e c'hoantoù ma c'hell unan all kreñvoc'h egetañ lakaat e c'hoantoù da vezañ trec'h ? Ur gentel daer e voe kement-se evit an holl dud o doa kredet e vije bet tu d'ober eus ar gouarnamant kebegat benveg pennañ an dazont kebegat, en ur chom e diabarzh ar c'hevredad kanadat.

#### Ar Strollad Kebegat a-enep d'al linenn daer.

Un deirvet heuliadenn eus an enkadenn a voe anataat roll ar Strollad Kebegat evel nerzh-enebiñ nemetañ ouzh ar renadur a-vremañ hag evel hentenn beoc'hiek nemeti war du ar c'hennadur. E-kerzh an enkadenn e voe ar Strollad Kebegat ar strollad politikel nemetañ o tifenn dreistelezh ar vuhez denel hag ar frankizioù hiniennel, war ar pennabeg-Stad he ne baouezas ket pouezañ evit ma vefe kemeret diarbennoù evit tagañ gwriziennoù

an enkadenn gevredigezhel hag armerzhel a oa kiriek d' ar sponterezh. E-pad m'edo ar Strollad Frankizour, gantañ ar galloud e Bro-Gebeg, oc'h heul-liañ al "linenn daer" treset en Ottawa, ez ae an Unaniezh Broadel hag ar Ralliement Creditiste d'en em guzhat en un dilavar a-du gantañ. Skoaz a zegemeras ar Strollad Kebegat digant un talbenn boutin, ennañ meur a zileuriad eus nerzhioù demokratelañ gwirion hor c'hevredigezh : c'hweluniadoù micherour, ensavioù kevelouriel, kreizennoù skolveuriek, kelaouennerion, hag all... Anat e oa, ne oa etre feulster ar sponterion ha feulster ar re a zifenne ar "statu quo", nemet hent peoc'hiek hag adunvaner ar Strollad Kebegat. Ha kement-se a zo e gwirionez un azon kalonskañs evit frankiz da zont Bro-Gebeg. E-pad an nevez-amzer-mañ (1971) e tiskulias ur sondadur kentañ er mennoz foran e talc'he mat ar Strollad Kebegat d'e vrud-mat e-pad ma ne vane nemet un drederenn eus ar geodedcurion a-du c'hoazh gant emzalc'h al lêvierion e-pad mizioù here ha du 1970.

E-kerzh ar bloavezhioù da zont ez afo moarvat war vuanaat emdroadur an traoù. Gouzout a ra bramañ ar C'hebegad pezh a fell dezhañ ha gouest eo da varn e-unan, hag-eñ e klot pe get ar reizhiad a-vremañ gant e ezhemmoù. E 1970 en deus klaoustret e oa spletus mont a-du gant ar gevredelouriezh kanadat ha termenioù a zo bet merket : ret eo bremañ barn ar we-zenn diouzh he frouezh. Er c'heñver-se e sav meur a gudenn diazezel koulz war an dachenn armerzhel ha kedsevenadurel, ha war an dachenn bolitikel rik

Aet eo <sup>/an</sup> trec'h gant ar gouarnamant-mañ en dilennadegoù diwezhañ goude m'en devoe prometet daougementiñ an niver a c'hourweliou nevez e 1971 (eus 40 000 da 100 000). Evel-se e c'hellfe digreskiñ erfin ar feur-dilabour e Bro-Gebeg, ha n'en deus graet nemet kreskiñ abaoe 1967. En deizioù-mañ e sav ar feur-se da 9 % eus ar boblañs-labour, war-dro, da lavarout eo ez eo an uhelañ e Kanada. Dilabour e chom tost eus 200 000 Kebegañ. Grevus-oc'h eo c'hoazh an emdroadur, war washaat ez a stad Bro-Gebeg, e-keñver peurrest Kanada : etre 1945 ha 1950 e oa ar feur-dilabour e Bro-Gebeg, war-dro 25 % a-us da hini ar riez kanadat ; etre 1960 ha 1969 e tremenas an diforc'h-se a-us da 50 %.

Krouiñ gourc'hwelioù nevez a zegas evel-just kudenn ar postadurioù nevez. Jedet eo bet he dije ezhomm Bro-Gebeg eus 5,5 miliard dolar a bostadurioù nevez pep bloaz evit adkavout an herrder-kreskiñ a zo gant



peurrest Kanada. E-kerz' ar bloavezh tremenet na zegemeras ket zoken 3,5 miliard. Hervez mennoziou politikel ar gouarnamant a-vremañ ne c'hell dont ar c'hresk-se nemet eus ar gennad prevez, dreist-holl eus postadurioù o tont eus ar Stadoù-Unanet. Da heul e vefe gwashaet c'hoazh aotrouniezh armerzhel ar c'hevredadoù eus ar Stadoù-Unanet war Vro-Gebeg, a zo dija ganto an hanter eus an embregerezhioù greantel diazezet war hon tiriegezh. Emaomp o paouez gwelout ur brouenn druezus ha splann eus an degouezh-se e mezheven 1971 pa voe roet da gorvoiñ d'an adkevredad eus ar ramz lies-riezel International Telephone and Telegraph Company, diwezhañ koadeg vras Bro-Gebeg (un dekvodenn eus he ziriegezh !) evit ur feurm izel-kenañ ha gant ur bern skorcù hanterat ha dihanterat ouzhpenn. Kenderc'han a ray toaz paper ha reion diwar ar mirva divent-se gant ur priz-koustañ izel-tre.

#### Nerzh-dedennañ ar Saoznegerion.

Gant kresk armerzhel Bro-Gebeg e sav kudennoù all, o sellout ouzh framm kevredel ar riez. Degemeret e vez, da skouer, gant an holl ez eo ar feur-dilabour uhel e Bro-Gebeg, evit darn vras, <sup>un</sup> heuliadenn eus ar politikerezh koulzelour: heuliet gant ar gouarnamant-kreiz evit klask kabestrañ ur monc'hwezh o tiwanañ 'e ranndirioù pinvidikec'h evel Ontario, Alberta ha Kolombia Breizhveuriat. A-viskoazh ez eo bet diazezet ar politikerezh armerzhel kevredel war zegouezh Ontario en doare ma n'hollas morse Bro-Gebeg en em vataat eus ur politikerezh telled ha moneizel o klotañ gant hec'h ezhommoù dezhi. Gant Pierre TRUDEAU ne gemmas ket an traoù.

Merzomp evit echuiñ ez eo savet ivez politikerezh kenwerzhel ar gouarnamant kreiz diouzh ezhommoù Ontario ha diwar-goust Bro-Gebeg. Hervez un oberenn embannet nevez'zo gant un armerhour eus Skol-Veur Montréal ez eo bet priziet da 2 viliard dolar pe war-dro, hollad an telloù maltoutel bep bloaz etre Kanada hag ar Stadoù-Unanet. Daoust ma c'hell seblant faltazius ar sifroù-se d'ar sell kentañ, en deus diskleriet unan eus e vrudetañ ken-<sup>vrudetur</sup>vrudetur, a-du e-unan gant an tezennoù kevredel, ez ae war e veno, ar politikerezh armerzhel kanadat en e bezh a-enep da ezhommoù Bro-Gebeg. Ret eo eta da Vro-Gebeg reiñ bec'h div wech muic'h, hag hi en un endro displetus tre. Kentec'h souezhus e vefe ma teufe a-benn.

Muzuliet e c'hell bezañ binvidigezh ur sevenadar gant e nerzh-dedennañ an estrenion.



E Bro-Gebeg e kav gwelloc'h d'an holl enbroerion nevez koulz lavaret mont da vezañ darn eus ar bihanniver saozneger, ha d'ar skolioù saoznek e kasont o bugale. Chalus-kenañ eo ar gudenn-se e Montreal dre ma vez dedennet peder gwech muioc'h a enbroerion gant ar stroll a orin breizhveuriat eget gant ar stroll gallek, daoust ma z'eo hennezh peder gwech bihanoc'h ne dost E-touez ar skolidi, ha n'eo ket nag ar saozneg nag ar galleg o yezh-vamm, n'eus nemet 10 % a-vec'h evit daremprediñ ur skol c'hallek e-pad maz a ar re all d'ober an 2/5 enn eus skolidi ar skolioù saoznek. Ha c'hoarvezout a ra kement-se daoust da strivoù niverus ar gouarnamant : dicuer a ra dezhañ skoazell ur framm politikel na c'hell kaout nemet gant ar frankiz politikel, hag aon a zo gantañ rak displijout d'ar Ganadiz saozneger. Muzulioù alius hepken a c'hell divizout ha dister eo eta o levezon wirion e-keñver nerzh-dedennañ ramzel ar boblañs saozneger stank e Norzamerika.

#### Kaelioù yezhel.

Perak ez afe an enbroerion d'en em heñvelaat ouzh ar c'hallegerion pa z'eo ar saozneg ar yezh labour e Bro-Gebeg ? Noarvat ne ouzer ket o deus labourerion gebegat ar General Motors Company en em vataet nevez'zo eus un harz-labour evit goulenn ar gwir d'ober gant ar galleg evel yezh labour ha n'odeus ket gounezet daoust da hanterezh foran ar Maodiern Kentañ a-du ganto. E saozneg e labourer en embregerezhioù bras ha n'heller ket pignat betek ar c'hargoù uhelañ, ha zoken betek ar c'hargoù etre hep ur beuranaoudegezh eus ar saozneg. Setu perak en deus prometet, araok an dilennadegoù, strollad ar gouarnamant ober eus ar galleg ar yezh-labour e Bro-Gebeg ! Met penaos e ray evit tizhout ar pal-se war un dro hep spontañ an embregourion estren en deus ezhomm eus o fostadurioù evit seveniñ promesaoù all, hag hep ereziñ ar Ganadiz saozneger, ez eus ezhomm anezho evit ma teuo ar gevredelouriezh kanadat da vezañ spletus evit Bro-Gebeg ? Emañ ar gouarnamant ur wech c'hoazh en arvar d'en em gavout war un hent all rak ned aio ket arc'hadurioù ar Gebegiz galleger war zigreskiñ en amzer da zont, er c'hontrol.

Stag-tre eo kudenn ar yezh ouzh kudenn ar reoladur armerzhel. Diskouezet o deus studiennoù sevenet nevez 'zo evit kont ar gouarnamant kevredel e oa ar stroll galleger en daouzekvet renk e-touez an holl strol-

loù gouennel a ya d'ober ar gevredigezh kebegat ; n'eus nemet an Italianed hag an Indianed evit kaout korvoderioù izeloc'h. E-pad ma sav da 4 940 dollar, korvoder bloaziek keitat ur C'hebegad a orin breizhveuriat, ne sav nemet da 3 185 dolar korvoder ur C'hebegat a orin gall ; ha c'hoazh ne zalc'her ket kont er stadegoù-se eus korvoderioù ar postadurioù (ar stroll saozneger en em vata dreist-holl diuto.) E gwirionez e tiskouez ar studienn se ez eo ar yezh ur gael, n'eo ket evit tremen dreist dezhi peurliesañ ar Gebegiz galleger, ha zoken gant ma vefent divyezhek. Gant se ez eo an dud na gomzont nemet saozneg a ya d'ober ar stroll kebegiz, dezho ar c'horvoderioù uhelañ. Evit pezh a sell eus ar re na gomzont nemet galleg, ne dalv ket ar boan resisaat emaint e traoñ ar skeul. Perak e vefe ret dezho asantif da chom eno ?

#### C'hwitadenn ar c'hempenn bonreizhel.

Setu bremañ pevar bloaz abaoe m'en deus skoet Kanada, sañset, war hent ur c'hempenn klok eus e Vonreizh, dindan vroud Bro-Gebeg. E-pad an tri bloavezh kentañ e chomas treut-askorn an disoc'hoù anezhañ, gouez da pep hini, ha ne oa ket bet sellet zoken ouzh kreiz ar gudenn, da lavarout eo ouzh lec'h Bro-Gebeg er c'hevredad hag ouzh ar galloud a-ziforc'h a vefe ret dezhi kaout war un hent dall en em gaved e gwirionez. Splann-spontus eo bet gwelet an dra-se e mizioù c'hwevrer ha mezheven er bloaz-mañ, da geñver an daou emvod diwezhañ a-zivout ar vonreizh. Deuet evel kannad Bro-Gebeg, e chome ar Maodiern kentañ kebegat etre daou vennoz hag anzav a rae e-unan ne oa ket ur mailh war ar c'hudennoù-se. Pleget en doa da gentañ dindan wask ar rannvroioù saozneger hag ar riez kevredel, en un asantcut gwelout an traoù nebeut-ha nebeut dre ar munud e lec'h stagañ gant ar gudenn en he fezh. O kenderc'hel war an hent-se ez echuas ar gouarnamant kebegat gant goulenn un dachenn veli nevez hepken (a-bouez memestra) : galloudoù klok eviti nemetken war dachenn al lezennoù kevredigezhel. En eskemm, e leze da intent en un doare splann e sentfe ouzh disentezhioù ar c'hevredad evit ar peurrest, en dazont. Daoust d'ar strishadur reuzus-se ne voe ket degemeret zoken ar goulennoù kebegat gant ar re all. Kinniget e voe er c'hontrol d'ar gouarnamant kebegat ur garta ma oa nac'het enni e c'houlenn nemetañ ha neuze ne c'hellas ar Maodiern Kentañ kebegat nemet enebañ outi e-pad m'en

em gave a-du ganti en holl bennadurezhioù all. Da c'houde ez eo bet kaset ar breutadennoù da drompilh ar Varn ha peurgoazhañ a ra an touelladur e c'helle un oberadur nevesaat ur vonreizh kantvloaziat. Sklaeroc'h eo bremañ eget biskoazh n'eus nemet ur framm-kevreañ nevez etre daou riez kevatal a c'hello gwalc'hañ Bro-Gebeg ha war un dro diubiñ Kanada e-unan diouzh hilgennerezhioù a zeu da vezañ gwasoc'h gwashañ. Aze c'hoazh en deus kroget ar c'hilniveriñ ( e galleg : "compte à rebours" ).

Met n'eo ket ar gudenn vonreizhel an danvez-dudi nemetañ. Kizidik eo ivez ar Gebegiz ouzh kudenn jederezhel ar gevredelouriezh. Diskuliañ a ra ur studien embannet n'eus ket pell gant gouarnamant Bro-Gebeg, o deus paeet ar Gebegiz eus 1960 da 1968 ur miliard dolar tailhoù kevredel muioc'h eget n'en deus dispignet e Bro-Gebeg ar gouarnamant kevredel e-pad an hevelep prantad ; n'heller adkavout ar c'heñpouez nemet dre gemer e kont ar mad o deus tennet ar Gebegiz eus al labour sevenet er-maez eus Bro-Gebeg gant an amaezhidi kevredel. Talvezout a ra kement-se ez a Bro-Gebeg war goll evit pezh a sell eus Kanada. Ha prometet en doa koulskoude ar gouarnamant kebegat a-vremañ arack bezañ dilennet " ur gevredelouriezh spletus". Ret -groñs e vo dezhañ eta gounit spletoù fetis pa vo nevesaat an emglevioù evit dasparzh an tailhoù e derou 1972. Setu c'hoazh ur "chañs diwezhañ" ne vo ket dezhañ tremen e biv dezhi.

#### An dibab diskoulmus

Ret eo lavarout ur ger en dibenn a-zivout neuz hollek an darempredoù etre ar gouarnamant-kreiz hag ar gouarnamant rannvroel rak roet o deus dezho ar Gebegiz a-viskoazh ur bouez bras. En ur verzout al luskoù emrenelour galloudus sevenet abaoe un dek bloavezh bennak gant Bro-Gebeg e c'hellfed bezañ techet da grediñ ez eo net ar gevredelouriezh kebegat nebeut ha nebeut war-du un doare digreizennadur. Ar c'hontrol eo a zo c'hoarvezet avat. Abaoe tri bloaz he deus staget Bro-Gebeg e gwirionez gant un oadvezh kreizennadur kreñvoc'h eget biskoazh. Dezhañ pinvidigezhioù kellidel kalz brasoc'h a bell eget d'ar rannvroioù, en deus ar gouarnamant kevredel aloubet pep hini eus gennadoù-diazez an obererezh politikel : kontrol ar c'hehenterezh, gwarezadur ar vevezarion, ar stourm ouzh ar saotradur, diagelroez ar c'horvoder, surentezhioù kevredigezhel,



hag all... Dedennet gant skouer ar gevredelouriezh amerikad kreizennet mui-ouzh-mui ha broudet gant c'hoantoù broadelour Kanadiz saozneger, en em gav rediet ar gouarnamant kevredel da c'hoari ur roll-sturier brasoc'h-brasañ war holl dachennoù pouezus ar vuhez kanadat. A-hend-all n'eus ket kalz morc'hed gantañ er c'heñver-se.

E lec'h all ebet n'eo ken splann an dra-se ha war dachenn an diorreadur armerzhel. Dre heg en deus emellet ar gouarnamant kevredel er c'hudennoù-se gant an digarez da stourm ouzh an dizingalderioù rannvroel ha da skoazellañ Bro-Gebeg da dizhout en-dro ar barr tizhet gant peurrest Kanada. En deizioù-mañ n'eus koulz lavaret postadur prevez nevez ebet a c'hell bezañ graet hep bezañ bet diskouezet arak da Ottawa gant ar spi da zegemer ur skor digant ar stad ; diskouezet e vez zoken da Ottawa da gantañ raskouerioù ar postadurioù foran war dachenn ar paramantadurioù-isframmadur, hag emañ Ottawa o kontrollañ hag o kellidañ ivez an darn vrasañ eus ar saverezh-annezioù ha burevioù. Piaouañ a ra ar porzhioù hag an aerporzhioù. Gant e bolitikerezh evit ar gremm ne ren ket hepken an enporzhiañ hag an dasparzh tireoul met ivez diorren an ijinerezhioù eoul-gimiek ; gant e bolitikerezh kenwerzhel hag e brenadennoù evit al lu, emañ o ren diorren ar saverezh tankirri ha nijerezhioù ; gant e veli war ar c'heñterezh emañ o seveniñ ul levezon vras war an ijinerezhioù greantel o labourat evit ar gennad-se. Evit gwir ez eus tu da venegiñ an holl gennadoù-diazez. Dirak an degouezh-se e kendalc'h ar bolitikourion gebegat d'ober prezegennoù ha promesaoù : n'int ket evit ober kalz muioc'h. Hon degas a ra kement-se en-dro d'an dibab diskoulmus m'en em gav dirazañ ar Gebegiz : ar rezid politikel pe ar c'hendeuziñ evit mat er stroll kanadat.

#### Un embregadeg a ganadur yoc'hel.

Gwelet hon eus dreist-holl betek-hen an abegoù pennañ, a c'hell degas ar Gebegiz da ziabenn ar gevredelouriezh kanadat ; ni zo vont da welout bremañ an abegoù a c'hell o vroudañ da vennout sevel o bro dezho o-unan.

Ur gevredigezh arnevez eo Bro-Gebeg ha kemer a ra perzh e kudennoù ar bed a-vremañ. O vezañ m'en em gav e-tal ar Stadoù-Unanet, he deus he lod eus rogerezhioù don hor sevenadur kornogel hag eus nagennezh hor

c'hevredigezh-beveziñ. Dacust dezhi bezañ un ezel paour e klub ar broioù pinvidik ez anavez, dre skiant-prenet, kudennoù ar foranerezh hag ar saotradur, gwallskouer ar baourentezh e-kreiz ar binvidigerezh, lieselfennegezhioù ar gevredigezh goude-greantel ha barregezhioù an araezhioù-kehentiñ nevez. Diouzh un tu all dre m'emañ o paouez kuitaat frammoù kevredigezhel a-ziwar-lerc'h ar c'hantved diwezhañ en deus ranket ar c'hebegad diorren an temz-spered ret-se evit degemer an treuzfurmadoù gwriziennel a c'houlenn hon amzer, zoken ma chom merket c'hoazh an temz-spered-se gant an tennerioù a heuilh bepred ur gemmadenn geyredigezhel herrus.

O terc'hel penn ouzh kudennoù bras ar bed e verz avat Bro-Gebeg he doareoù dezhi hec'h-unan. Ur vro vihan eo, peoc'hiek hec'h hengoun ha ganti c'hoantegezh ebet d'en em astenn. Levezonet kalz e chom he sevenadur a orin europat gant talvoudoù heverk an hêrezh c'hall ; war un dro ez eo he yezh un diforc'h diouzh hec'h amezeion dostañ hag ul liamm gant ar broioù galleger all. Setu perak e fell da Vro-Gebeg kaout ar chañs, da vianañ, da ijinañ he diskoulmoù dezhi hec'h-unan evit ar c'hudennoù a zo war un dro he re dezhi ha darn eus kudennoù ar sevenadur.

Emañ Bro-Gebeg oc'h imbours'hiñ ur patrom diorreadur a vefe dezhi hec'h-unan. Ent bredoniell e sant an ezhomm d'ijinañ, da grouiñ. Satget he deus da eztaoliñ an derzhienn-grouiñ-se dre hec'h arzourion, he c'hane-rion, hec'h ijinerion hag he zisavourion. Bremañ e fell dezhi gallout reiñ ar chañs d'hec'h arbennigourion war aozidigezh an egor naturel hag an endro kevredigezhel da lakaat war ar stern o gweledigezh eus an traoù. Fellout a ra dezhi termenañ hec'h-unan hec'h ezhommoù-mallusañ war dachennoù an armezh hag ar gevredigezh, en ur sevel he zi hervez he raktresoù dezhi hec'h-unan.

Ur seurt embregadeg a gadarnadur yoc'hel ne c'hell bezañ kaset da vat nemet gant perzhiakaat oberiant ha poellek ar boblañs en he fezh ; ha n'eus perzhiakaat ebet hep atizadur ha sterniadur. Setu perak n'heller ket menegiñ ar glaoustre gebegat hep lavarout ur ger eus hec'h atizer politikel : ar Strollad Gebegat. Krouet a-vec'h tri bloaz zo, ez eus hiziv war-dro 80 000 ezel gant ar strollad-mañ, pep hini o paeañ ur skodenn. Ganto e vez kollidit dreist-holl, ha ned a ket da heuliañ un "establishment" bennak ( \* e saozneg en destenn). Ent demokratel ez eo leviet gant

ul leviour hag ur poellgor-erounit, dilennet evit ur bloaz hepken. He roll-labour a zo frouezh ul labour a-stroll sevenet gant kantadoù a zileuridi bodet er bodadegoù-bloaz. Dreist-holl, dre ma kemer perzh e kudennoù pemdeiziek ar Gebogiz ez eo deuet da vezañ buan un nerzh-araokaat jag un nerzh a ingalder kevredigezhel, gouest da ontañ evel biskoazh a-raok ha da lakaat da gemer perzh, holl nerzhioù bev ar vroad.

#### Rezid politikel ha kevredelezh armerzhel

Hor pal a zo ober eus ar Strollad Kebegat unan eus ar binvioù pennañ, ma c'hello ar boblañs en he fezh, en un doare emskiantek, a drugarez dezho, kemer an disentezhioù a sell outi araok ha goude an dieubidigezh. Gouzout a ouzomp evel-just ez eo gwall-vihan dre ar bed niver ar strolladoù politikel a zo deuet a-benn da vezañ binvioù efedus evit politikaat ar yoc'hoù. Met gouzout a ouzomp ivez n'eus hent all ebet evit dieubiñ ar pobloù evit mat.

N'eo ket ar stourm kebegat eta ur striv evit en em serriñ warni hec'h-unan. Emskiantek-tre e chom ar C'hebegad eus ar genlevezon gant e amezeion ha broioù all ar bed. Ouzhpenn-se e kaver e roll-labour ar Strollad Kebegat ar rezid politikel hag ur gevredelezh armerzhel gant peurrest Kanada.

Diaes e c'hell seblantout d'an Europiz kompren perak e klask Bro-Gebeg dont er-maez eus ur framm kevredel er mare ma vez techet muioc'h-mui pobloù liesseurt d'en em strollañ e frammoù usbroadel \* . Pell-tre e chom Europa e gwirionez eus ar gevredelouriezh ha ne c'heller ket meizañ enni perzhioù fall ur c'hreizennadur re greñv. Ouzhpenn-se e seblant reizh reiñ d'ur stumm-gouarnamant nevez vertuzioù n'en deus ket dre ret. Sellout a reer da skouer ouzh ar gevredelouriezh evel un diogelroez brasoc'h evit ar frankizioù hiniennel. Kement-se a zo disoñjal ez eo disheñvel-tre an derez frankiz hiniennel hervez ar c'hevredadoù evel m'hen diskouez istor ar Stadoù-Unanet, an Unaniezh Soviedel ha Brazil. Ouzhpenn-se ez eo disheñvel an amplegoù kevredigezhel. Gant broioù Europa, dezho hengounoù hir, ez eo aesoc'h tostaat kenetrezo hep lakaat en arvar o stuzegezhioù disheñvel ; ouzhpenn-se ez eus gant e un doare kempouez poblañsel.

Disheñvel-kenañ eo degouezh Bro-Gebeg hag hi galleger kollet er mor saoz-neger.

\* usbroadel : supranational.



E gwirionez e tle ar stummoù-kevrediñ etre ar strolloù denel en em dreiñ gant red an darvoudoù ha n'eus ket ur patrom a vefe talvoudus dre ar bed a-bezh. Emañ Bro-Gebeg o klask un doare kevrediñ gant Kanada da gentañ, gant ar broioù all da heul, pezh a roio dezhi an tu d'en em ziorren ha da grouiñ, n'he deus ket hiziv er frammoù kevredel. E dalc'h ar stourmse emañ treuzvuhez ar vro evel m'emañ en e zalc'h he bleuñvidigezh hag he degasadur bihan da arakaat an denclezh.

